



BANNILOU AR FEIZ E PARDONIOU BREIZ

Photo Jos Le Doaré

Bleun-Brug

Niv. 39-40

GOUERE-EOST 1951

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1951 ?

Ma n'eo ket, her grit raktal,
Eun tammig bolontez vat mar plij,
Ha bennoz Doue d'eo'h !

- | | | |
|--|-----|-----|
| 1) Koumanant bloaz d'an 12 niverenn, brezoneg ha galleg. | 400 | lur |
| 2) Koumanant bloaz d'an 8 niverenn brezonek hepken | 300 | lur |
| 3) Koumanant d'ar 4 niverenn c'hallek hepken | 190 | lur |
| 4) Koumanant a enor | 500 | lur |

**Kas an arc'hant da : V. Seite, Bleun-Brug, Tréboul (Finistère).
C. C. P. 544-22 Nantes. — Lakaat ouz kein ar chekenn-bost pe ez eo
eun adkoumanant, pe unan nevez.**

TAOLENN

Hon Tad Santel ar Pab d'ar Vretoned	1
Ar Vretoned e Rom	3
Sonjou war eur pirc'hirinaj, gant J. Ch.	3
Aotrou 'n Eskob Gwened da Renerien ar Bleun-Brug	5
Pedenn evit Breiz, gant Y. B. Kalloc'h	6
Mamm ar Vro besit silvidigez ho Pretoned, gant L. B.	7
Eur familh sent, gant an Ao. Chaloni Batany	8
Hor sent koz, gant J. Konan	11
Kenavo Bastian, gant L. Lok	12
Spered Treger : ar zouc'h aour, gant B. Charlez	13
Pemp leue, peder bronn, gant L. Marc	15
Emgann an Tregont, gant Reun Argant	17
Porz-houarn Kastell-Paol, gant V. Fave	18
Kemener ? Miliner ? gant K. Riou	19
Pajenn ar Vugale, gant K. Riou	20
Da eured al laouenanig (son)	21
Dre Vreiz ha dre ar Bed	22
Korn al liziri	24
Kas an dorz d'ar gër, gant ar Bigoudenn	24
Kamp Etrekeltiek ar Vrezonegerien	25
Geriou Krouaz	25

133657

Hon Tad Santel ar Pab d'ar Vretoned



Ar brezegenn-mañ a zo bet graet e Rom, gant hon Tad Santel ar Pab, da geñver an deiz m'eo bet laket Julian Maner e renk an dud eürus.

EUR gaer a gentel, mibien garet ha merc'hed karet, a ro d'eomp buhez Julian Maner, e istor hag ar brud graet d'e vertuziou, eur gentel hag a zesk d'eomp beza troet kentoc'h da grompren e tu mat ar bed hag an traou, en eur zigeri koulskoude hon daoulagad war an tu gin, en eur veza aketus hag oberiant, hor fizians diazezet war Brovidans Doue.

N'eus ket da lavaret nann ; pa gomprenet, en amzer vremen e weler mab-den gwasket gant dienez e meur a zoare, trubuilhou ha skoilhau a bep seurt o virout ouz ar broiou d'en em zevel ker buan ha ma karfed, dic'halloud an doareou a gaver da gompesa ar bed ha dic'halloud an den d'o implija ervat...

Daoust ha muioc'h a lec'h a oa da gredi ha da gaout fizians en amzer hag er vro ma veve enno an den eürus nevez ! N'oa ket nemeur desketoc'h an dud war dachenn ar feiz ; nemet d'an ampoent n'oa ket goloet an diouiziegezh evel hirio gant eur gwiskad tromplus a zeskadurezh diwar c'horre ha didalvez war skianchou ar bed. Troet oa an dud gant an eva-re ma gant an holl dechou-fall a zeu da heul. Frouez ar brezelioù a relijion, restachou kredennou faos an eretiked a oa c'hoaz gwasat ar gaou a raent gant an dic'halloud ma oa ar veleien, re nebeut anezo ha re ziaket alies. Ouspenn e oa diaesoc'h al labour war dachenn an eneoù hag an abostolerez dre 'n abeg ma oa trouz ha dispac'h etouez ar bobl diwar goust an tailhou. Hag an daolenn-ze n'eman ket c'hoaz pep tra warni ; gant komparrachi, e vefe kavet marteze ez a gwelloc'h c'hoaz ar bed ganeomp-ni.

Petra 'zo c'hoarvezet eta e Breiz evit ma vefe gallet, abaoe, rei ar vro-ze da skouer d'ar bed evit he buhez entanet, renket, gwriizennet don enni ar feiz ? Hervez ar Vretoned o-unan, an enor eus ar wellaenn-ze — goude beza e roet da Zoue, d'ar Werc'hez, d'ar zent koz — a zeu d'ar visionerien, hag en o zouez e roont ar renk kenta d'an den eürus Julian Maner.

Petra en deus graet eta ha penaos eo deuet a-benn ? Bez e voe abostol na muioc'h na nebeutoc'h met eun abostol gant kement a dalvez ar ger-ze : abostol an Aotrou Krist, bet er skol gant ar Mestr, doujus d'e gelennadurezh ha d'e gentelioù. Kalz a gristenien gredus a zo o c'hoant beza eus an ebesele-ze, lod hep goût mat awalc'h petra eo eun abostol ha petra en deus da ober ; kalz re all — hag aze eman hon levezenn — sklaer en o spered petra eman hor Zavez o c'hortoz diouto ha petra a zo en o zont seveni. Aked entanet d'al labour. Kont mat da zerc'hel eus stumm-spered tud ar vro hag an amzer, setu aze d'hor zont etouez kalz doareou all, ar pezh a verk spered ha labour an den eürus Julian Maner, devot bras d'ar Werc'hez evel ma voe, en e amzer Sant Yann Eudes ha, war e lerc'h Sant Loeiz Grignon a Vonforz. Marteze en devoa e zoare d'ezan e-unan da intent an abostolorezh evel n'o deus bet meur a hini all, marteze ivez, sur awalc'h zoken, eo e zoare e-unan d'hen intent eo en deus graet d'e labour dougen frouez.

Aked dreist muzul d'al labour ; war ar poent-ze e c'hell beza lakaet an tad Maner keit ha keit gant n'eus fors pehini all ; n'en deus ket e bar : labouriou, skuizder, diëzamanchoù, poaniou hep ehana gwech ebet, na damanti a-hed an aridennad misionou a brezegas hep paouez, ha peseurt misionou ! war an douar bras hag en inizi, prezegennoù, prosesionou, katekizou, kofesionou, gweladennoù d'ar re glanv ha kement-ze. O lenn istor e vuhez ec'h en em c'houlenner penaos en deus gellet eun den e-unan herzel ouz kemend all ! penaos en deus gellet e gorf padout outan, Penaos ? dre vertuz al lavarenn bayan roet d'ezi eun dalvoudegez kristen : **Mens agitat molem** (Verg. *Acneis* 6727). Den oberiant muioc'h eget nikun, e lakae ar studi uheloc'h eget ar seveni hag ar bedenn uheloc'h eget ar studi. Ken troet oa gant ar bedenn, ma krede d'e vestr Mikael an Nobletz oa e zever d'ar heñ warnan gant aon na rafe gaou ouz e abostolerez. Diskouez a ra an istor n'oa ket aon ebet da gaout war ar poent-se ; diskouez a ra, er memes amzer, eus peseurt mammenn, krenv ha digailhar, e tarze e aked dishenvel. Resevet en devoa digant Doue, emezan e-unan, eun donezon a bedenn hag e dalc'he, dalc'hmat, en union gantan.

Lavaret e vez, gant gwir abeg, awechou ivez gant eur gredenn eun tammig bugelel, e lle an aked d'ar heñ kont eus an amzer ma vever hag eus an dud a zarempred. Sant Paol hel lavare dija pe gwelloc'h a roe ar skouer a gement-se : **omnibus omnia factus sum ut omnes facerem, salvos** (1. Kor. 9-22). Evel-se e rae ivez an den eürus Julian Maner ha ret e vefe klask mat evit kaout unan bennak da vont dreistan war ar poent-se. Evit en em ober diouz an holl eo e tesk o yez diës, eo e ro e gelennadurez gant sikour taolennou bras livet warno ar c'hreansou hag ar gourc'hemennou, eo e laka e genteliou e kantikou aet ken doun er sperejou ma vezont kanet hirio c'hoaz ; kant tro all a gav c'hoaz evit skei ar sperejou hag ar c'halonou betek ar voedenn. Ma kar beaji dreist-holl war e droad ha dre an henchou-bras eo gant ar zonz da gaout war e hent ha d'o dastum an oaned hag an danyadezed diantket. Henvel ouz an tad mat a familh e fennas eus e denzor « **nova et vetera** » (Maze 13-52) traou nevez ha traou koz hervez ezomm an eneou.

Bretoned kalonek, kanit meuleudi d'ho ten eürus, dalc'hit mat d'e genteliou, evel m'o deus graet ho tadou, goulennit digantan, gant fizians, ar c'hras da zerc'hel mat ha da vont var arok gant hent ar feiz hag ar vuhez kristen. Beleden hag ebestel Breiz ha re all a bep lec'h kemerit skouer diwarnan ; an hent a ziskouez d'eoc'h a zo asur ha kas a ra da benn ; e bedennou, eus ar baradoz, a gaso war araok, dre hoc'h aked, al labour boulc'het gantan war an douar.

Ha c'houi holl, entanet gant ar c'hoant da astenn rouantelez Doue, c'houi holl hag en em zispign evit savetei ha renevezi hoc'h amzer hag ho pro, kemerit skouer diwar an Tad Maner. Aked dibaouez d'ezan met aked tarzet eus e garantez vras evit an aotrou Doue ; kemerit skouer diwarnan, dispart pa veze ret en em ober diouz e amzer, war dra pe dra, met atao fidel d'ar pezh a jom mat da viret er boazamanchoù daoust ma tro an amzer, o veza m'o deus eun dalvoudegez hag a bad.

Ha ni, mibien garet, ha merc'hed karet, ni hag a c'houlenn mia kouezo warnoc'h grasou Doue, d'ho santelaat, madoberou ar Werc'hez dinamn, skoazell Santez Anna, Sent koz ho pro, an den eürus Julian Maner, ni a ro d'eoc'h gant hor c'harantez a dad en he fez hor bennoz a Bab.

★

Goude e brezegenn e teuas an Tad Santel da varvailhat gant ar bele-rined. Goulenn a reas ma vefe kanet kantig an Tad Maner. Ha pa darzas son skiltrus ar vombard hag ar biniou — ar wech kenta oa d'ezo moarvat da dregerni dindan bolz iliz veur Sant Per — e tride al levez e daou-lagad an Tad Santel.

AR VRETONED E ROM

DAOU c'hant bennak a Vretoned a zo aet da Rom evit klêvet diskleria an Tad Maner, Den-eürus. En o fenn edo ar c'hardinal Roques, arc'heskob Roazon, Aotrou N'Eskob Kemper hag Aotrou N'Eskob Sant Brieg. An darn vrasa eus ar bire'hirined a oa eus a Vreiz Izel, eun tregont bennak eus eskopti Roazon. Da greski ar vandenn, ez oa deuet ive eun ugent eus Pariz, ha tro-war-dro, Bretoned divroet, stag mat o c'halon ouz bro o c'havell. En o zouez ez oa eun nebeut skouted Bleimor ; an dud yaouank-mañ, gant o banniel gaer hag o biniou, a roas eun ton breizad d'ar pere'hirinaj a-bez.

Al lidou sakr a voe graet en iliz veur Sant Per, da zul an Dreinded, 20 a viz mae. Diouz ar mintin, an ofis a zigoras dre an diskleriadur eus vertuzioù an Tad mat, ha raktal goude, e skendenn a lugernas, e kreiz eur mor a c'houlou hag a c'hloar epad ma kaned an Te Deum war ar brasa ton. An ofereñn bred a voe lidet warlerc'h.

Goude kreizteiz edo ell lodenn ar gouel. An Tad Santel ar Pab, en-dro d'ezañ ar gardinaled, a deuas da enori relegou ar misioner santel ha da bedi dirazo. Pa voe echu ar gouel, an Ao. N'Eskob Fauvel a roas bennoz ar sakramant dirak ar Pab.

Da veur vintin ar bire'hirined a voe digemeret e palez an Tad Santel, er Vatik. Hemañ, goude beza graet, e galleg, meuleudi an Tad Maner, a lavaras eur gomz vat d'an holl, a roas e vennoz hag a dremenias dre gichen pep hini en eur rei e vizou da bokat.

Ar weladenñ-se en deus skoet ar muiad ar bire'hirined hag a jomo pell moulet en o c'halon...

Lakaat a reomp amañ an diskan eus gwerz an Tad Maner, bet kanet meur a wech epad ar bire'hirinaj. An ton, eun tammig melkonius, evel hini ar gwerzioù, a zo kaer hag a ro brasoc'h talvoudegez d'ar ganaouenn :

« Meulomp, meulomp Bretoned, meulomp an Tad Maner

Abostol bro Breiz Izel, gwir vignon Hor Zalver ;

Mat eo bet hed e vuhez evit hon Tadou koz ;

Evidomp-ni mat eo c'hoaz bremañ er Baradoz. »

SONJOU WAR EUR PIRC'HIRINAJ

Rom, 20-5-51.

MA gwir eo 'ta e kouske dous ar Vretoned, « o tiskuiza war vrud o Zent koz », pa zeuas kelou dezo e oa savet an Tad Maner war 'n aoterioù ? Ken boazet e oamp-ni 'ta da gredi ne oa Sant breizad ebet, nemet e ve Sant Erwan, hag a vije bet « santelaet » gant Rom ? Hag ar broioù all, gant p'ioù eo bet « graet » o Zent kenta ? Kredi 'ran n'emañ ket aze koulskoude abeg hon eston hag hon disablanted. Pelec'h 'ta ? Setu : Daoust d'e vras a labour-aviela, n'eo ket mui anavezet an Tad Mat en darn vrasa eus hor Bro.

Eun enor dispar a rae deomp Rom koulskoude o lakaat unan eus hor c'henvroiz war roll an dud eürus. Hag evit mont d'ober eur ward a enor d'ar c'houlz gloriuse, ...ne oamp nemet daou c'hant, daou c'hant Breizad hepkén. O ! ne vanke ket an digarezioù : kalz a oa bet dija e Rom evit ar Jubile, priz bras ar veaj, eur mare fall er bloaz... Met, e gwirionez, ha komprenet he doa ar bobl e oa enoret Breiz a-bez dre ar gloar roet d'eur Breizad ?...

★

Pebez eston evit eur bire'hirinez eus Keraez o welout Bretoned yaouank eus Paris pe Rouan hag o doa sonjet mont da gemer perz er meuleudioù rentet d'unan eus hon Tadou er feiz !

Kredet o doa ar yaouankizou-se e vefent bet kollet e-touez eur pirc'hirinaj breizad ; rak abaoe pell'zo o doa kuitaet ar vro ; lod zoken ne oant ket bet ganet e Breiz. Met gouzout a raent e vijent bet degemeret mat, ha n'o doa ket aon.

Penaos 'ta displega souezenn darn anezo pa 'n em gavfont e porz-kouarn Lion gant eur pirc'hirinaj eus n'eus fors pelec'h ! Ha se 'oa Breiz o vont da Rom da enori unan eus he bugale ? Beza chomet hep rei eun ton breizek d'ar pirc'hirinaj a verk e lezomp da vont da fall, buan-buan, kement tra a ra ac'hanomp beza Breiziz.

Marteze ivez en deus pep hini kontet war e amezeg. Evel gwiskamant : pevar goef hepken ; banniel, seurt ebet. Ha lorc'h a c'helle beza gant Breiziz yaouank Paris da veza degaset ganto o bannielou, o bombard hag o biniou. E-lec'h beza kollet e touez Breiziz « du-mañ », i eo, e gwirionez a virfe diouz ar pirc'hirinaj da veza hini n'eus fors pelec'h.

Ha setu ma c'houlenner digant Skowted Bleimor, hep ehan, kanou ha korollou breizek.

Venezia, Fiorenza ; Asizi, dreist-holl. El lec'h benniget-mañ e pigne sioul hor pedenn diouz an noz : « Mor a zudi eo prederia A-héd an noz ». Pedenn laouen en diskuiz, goude kan rust ar Gedour dirak lennou Venezia.

A ! oferennou ar pirc'hirinaj. E Sant-Per Rom, iliz kaera ar bed, ha, war eun dro, ti pep hini ac'hanomp, betek an hini truilha ; e St-Erwan-ar-Vretoned : eun iliz vihan, bihanik, ha ken dous goude dont eus an ilizoù kran. Hag e sonjer eno e komzou Y. B. Kalloùc'h :

« O douter en overenneu en ur chapel,
Ur chapelig didrous e mezeu Breiz-Izel !
Bout dré ur galon hlan, eur houleu en dister... »

Hag e peder evit ar vro, evit ar ne oant ket ganeomp. Hag an oferenn er « c'ha-takombou » (beredou dindan-zouar), evit trugarekaat Doue da veza hadet ar feiz e Breiz hep ma vije bet skuilhet gwad ar gristenien. Nag a eurvezioù fromus ha pinvidik !

Fromusoc'h moarvat eget re an esmaeou bras : lidoù an « evuruzidigez » ; met lec'h meurdezus Sant-Per na zeñ ket a-beñn d'ho paka a-bez ; muioc'h e plij d'ar C'helt ar bedenn sioul eget ar meuleudioù youc'het a-bouez-penn. Ar Pab o tont en iliz-veur Sant-Per : n'eus mui nag amzer, na lec'h. Tad an holl eo ar Pab. Ha dreist da bep mestr, da bep roue, ez eo meulet ar Pab.

Met perak 'ta ne oa plas merket ebet evidomp, ni, deut eus keit all, ha bet o pedi atao asambles betek neuze ? Pep hini a yeas e-lec'h ma c'hellas. Ha ne oa ket gwelloc'h evelse.

Met d'an deiz warlerc'h en em gavemp holl en iliz ar Jezusted, ha d'an abar-daez e St-Erwan-ar-Vretoned, e-lec'h e c'helljomp kana meuleudi hor Sant Patron e brezoneg. Ha den ne voe feuket gant ar re yaouank o tansal korollou breizek dirak ar chapel.

Hag holl, eveljust, en em gavemp evit selaou H.T.S. ar Pab ! Holl gant bannielou Breiz, ha biniou ha bombard. Bez'e oa ar mare nemetañ d'en em ziskouez Breiziz, p'edo ar Pab o vont da veuli hor Feiz hag hor Breiz. (Sellit ouz ar pennad kenta). Ha setu perak en deus fellet deomp kana dirak H.T.S. hor c'han broadel : « Bro Goz ma Zadou ». (N'eo ket dioustu e vo dizonjet ar munutennou-se gant ar birc'hirined). Setu perak, war goulenn ar beleien-veur, hon eus c'houezet en hor biniou ha kanet meuleudi an den eürus nevez er yez en doa desket. Hag ar Pab o tont en hon touez evel eur gwir Tad e-kreiz e vugale ha n'int bet biken treitour d'ar feiz katolik : « Da Feiz hon Tadou koz, ni 'zale'ho mat atao ! » Hag a-us d'hor penn ar banniel o tougen gerioù-stur ar Bleun-Brug : « Feiz ha Breiz ! » Petra n'hon dije ket roet' vit ma vije padet pelloc'h eur c'houlz ken kaer, ken dous, p'edo ar Pab o komz gant ar yaouanka ac'hanomp ha gant hor zonerien. Tremen'ra pep tra...

Met an deiz goude, e tistroemp d'hor bro, kristenoc'h, ha breizekoc'h. Ha d'an diweza pedenn diouz ar mintin graet gant ar birc'hirined e aspedemp start :

« Breiziz, pedomp a galon ma vo adsavet Breiz
En he c'haer, evel gwechall, gant he yez hag he feiz ».

HERVEZ J. C.

Aotrou 'n Eskob Gwened da Renerien ar Bleun-Brug

Aotronez,

A galon vat ha gant levenez e ran digemer da gendalc'h ar Bleun-Brug e Santez-Anna-Wened.

Diazezet start eo breman brud ar Bleun-Brug goude ar gouelioù kaer hoc'h eus savet abaoe ar brezel ; mouget pelloc'h ar rebechoù toull a glasked ober d'eoc'h. Bezit fougennoc'h : a viliadoù e tiredo da Geranna e miz Eost a zeu Bretoned ar vro : d'o heul Bretoned divroet ha kalz tud all.

N'eo ket souezus avat pa ouzer petra glaskit :

Diskouez d'an holl
Breiz en he c'haer hag en he sked,
Breiz en he feiz.

Daoust ha lec'h santeloc'h a ve e Breiz ha c'houekoc'h da galon ar Vretoned eget Santez-Anna ? Daoust ha n'eo ket eno ez eo plijet ganto sevel ar bez-meur en enor da vugale ar vro kousezet war maezioù-ar-stourm e-kerz ar brezel bras.

Y.-B. Kalloùc'h en devoa skrivet :

« Hanueu er re kouehet, douar Arvor ou miro. »

Hag eur barz all a ganas :

« Na hé ! na leur ! mès Breiz-Izel En dès chonj ag è bugalé Hi a sañou kroezieu ihuel Limaj hé sudard ital dé.	« Deu gant mil hanù e vou merchet Ar mein kalet er hroezieu sé Rak deu gant mil a Vretoned Fit er vro è hras o buhe. »
---	---

Evit petra ez int maro ?

« Iné kornog, hé douar, hé merhed ha hé bleu,
« Oll kened er bed e, en noz-man, e viran. » (Kalloùc'h).

Hag e lavaront d'eomp : « Dirak talbenn ar vro, deuet eo ho tro da ober ar ged evit difenn he douar hag hec'h ene ».

C'houi a lakay da splanna Breiz en he c'haer gant kement o deus ijinet hon tud koz evit rei blaz ha liou d'o buhez, lans d'o spered, douter d'o c'halon : gwiskamantoù, korollou, sonerezh, c'hoariva, barzoniezh, boazamantoù... Gened koz a lavaro lod, ya, gened koz ha bepred nevez, rak

Gened a ouenn vat
N'he deus ket a oad
Hag a rumm da rumm a bad.

Kaer dec'h, kaer hirio, kaeroc'h warc'hoaz. Broioù all a zo hag o deus dilezet pinvidigezioù arzel ar bobl hag en o lec'h n'eus bet lakaet netra : paour ha noaz eo breman ar broioù-ze evel eur c'hoadad fao diskaret gant ar vouc'hal pe losket gant an tan-gwall.

Ha c'houi a gred n'eo ket aet d'an hesk mammenn ar gened e Breiz : klasket ez eus bet he stanka met n'eus da ober nemet digeri ar gwazioù a gaver er goueled anez, hag e larzo adarre dour an awen da lakaat da dridal ha da lammal sperejou ha kalonoù ar Vretoned. Broadou all zoken a zeuio di da derri o zec'hed. C'houi a gred e c'hell sevel diwar ar penn-goz koz, en despet d'an ilio gouez a venni e zizec'ha dre hir zuna, neveza-dennou glaz, ar seo o virvi enno. Pa vezo kresket ar skourrou yaouank, kana a ray enno an avel vor tonioù nevez da zidui ar Vretoned hag ar poblou all a jomo sioul d'o zelaou.

C'houi a lakay da splanna Breiz en he feiz. C'houek ha dudius oa warlene gwelet ar Vretoned diredet da Gastell-Paol da enori ar zent koz, tadou ar vro. Kredi a ra d'in e vo c'hoaz kaeroc'h gouelioù Keranna. Brudet eo al lec'h santel-ze dre Vreiz a bez ha c'hoant bras pep Breizad eo mont eur wech da vihana da bardona da Santez-Anna.

Deski a ray ar Vretoned kerzet war roudou Santez Anna, mamm goz hor Salver, ha mamm goz ar Vretoned ; war roudou Nikolazig, an den santel chomet divrud e skeud Santez Anna. Setu aze moarvat ar gwella doare da gerzet war roudou hor Zalver e-unan.

Pedi a raimp e Santez Anna evit Breiz.

« Hag estlammenn e rei er Bed koh get hé fé l » (Kalloch).

Gwened, d'ar 27 a Viz Even 1951.

Eugène Joseph Marie
Eskob Gwened.

PEDENN EVIT BREIZ

Kalon Jezuz !...

Eun ero ho poa digoret e kornog ar bed koz, eun ero war vor ;

Hag en ero-se ho poa hadet Kelted.

Aze edo ar greun gwella, ha c'houi a gemere bep bloaz, eun dornad anezañ d'hen strewi dre ar bed...

Darn a goueze e-mesk ar c'herreg, hag e varvent ;

Darn a goueze er bodou spenn hag o mouge ;

Darn all en douar aret.

Bugale va gouenn e voe ho kreun, hag e kement douar m'o hadec'h

E keltide kristenien greñv.

Samm ho kroaz santel war e skoaz, ar C'helt en deus graet tro an douar.

Evidoc'h en deus treuzet pep mor ; ha pep revann en deus douaret ennañ ;

Ha kement a vroioù hon eus savet enno ho kwezenn a silvidigez,

Ma n'ouzomp mui o anioù.

Pelec'h emañ an tonn n'he deus ket pieget da dud va gouenn ? an enez c'houez ha ne gousk ket e-barz eskern eur C'helt ?

Tan an abostolerez a enaouont er broioù hoil...

Met o hini a ankounac'haont...

Ac'hanta ?

Ha n'eo ket evidoc'h hoc'h unan eo o deus ankounac'haet o bro c'hinidik ?

Ha n'eo ket c'houi hoc'h unan eo hoc'h eus kemeret o spered hag o c'halon a-bez ?

Buhez ar sent a gelenn d'eomp, pa ne c'helle ket ho kariaded, tizout gant o zamm micher pemdeziek, dre hir ober wardro ho klod (kloar),

E tiskenne eun all d'eoc'h, da gas da benn o labour douarel.

Evel-se, pa lammit digant va gouenn he bugale wella, hini nemedoc'h ne renko ober en o lec'h dre amañ.

Pa c'houezont d'ho lezenn an douarou gouez, c'houi a zo d'eoc'h, evito hag o zud, mirout o douar.

Anez da-se an dud difeiz a lavaro, en eur ober goap : « E pelec'h' ta emañ o Doue ? »

Ha gwelloc'h e vo an traoù ganeoc'h pa ne vo mui Breiz ebet ?...

Gouzout a rit emañ beo atao ganeomp-ni an tan roet d'ar pobloù en hoc'h aviel ;

Gouzout a rit emañ glan hag e luc'h hep ehan e noz-mik ar baganiez a-vremañ,

Miret hon eus ho tan ; rak-se, mirit hor Bro.

Breiz diskaret, eur piled nebeutoc'h a vo en hoc'h iliz katolik ;

War aodou ar c'hornog, eun tour-tan nebeutoc'h evit ar pobloù da zont ;

Eur steredenn nebeutoc'h war an hent da Velteem ha da Rom. »

(Diwar : « Ar En Deulin »)

gant Y.B. Kalloch

N'helle ket Bleun-Brug Santez Anna chom hep komz eus Y.B. Kalloch, barz brudet Enez Groe.

Mar fell d'eoc'h klevout darn eus e gaera oberennou, deuit d'ar veilhadeg a vo graet d'ar sadorn da noz, 4 a viz eost, er « Scala sancta », araok an oferenn hanter-noz.

MAMM AR VRO BEZIT SILVIDIGEZ HO PRETONED

KEMENT ha m'emaomp e mare gouel Santez Anna, ne gavan ket gwelloc'h eget digeri an niverenn-mañ, dre ar bedenn gaer, a zesk iliz Breiz d'eomp ober d'hor Patronez, epad an deizioù-mañ !

« O mamm hor bro,
O Anna galloudek meurhet,
Bezit silvidigez ho Pretoned.
Mirit o feiz atao kreñv,
Harpit o gizloù fur,
Roit d'ezo ar peoc'h
Dre ho pedennoù santel. »

Diës e ve kaout eur bedenn all ken klok, kement diouz ezommou hon amzer, eget hounnez. Enni e kavomp diskleriet fraez ar pezh a glaskomp amañ, ar pezh evit petra e stourmomp er Bleun-Brug.

Her gouzout a ran eo eur bedenn, evel-se, diouz do-are an darn vrasa eus ar broloù kristen, hirio ; met koulskoude, ni, Bretoned, hor beus brasoc'h digareziou c'hoaz d'he lavaret. Rak eus uhel omp bet savet gwechall gant hor sent koz ; eus uhel omp bet chomet, keit ha m'hon eus heuliet o c'hentelioù, eus uhel omp staget, siouaz, da goueza, ha da goueza izel...

O touara en Arvor gwechall, hon tadou ne zigasent ket ganto nag aour nag arc'hant, met mard'oant paour a vadou korf, o doa eun teñzor kaer a vadou ene ; bez o devoa eur « feiz birvidik, eur yez pinvidik ».

Petra eo deuet an teñzor-se da veza hirio ?

Ar zent koz, endra ma troent hon tud koz war-zu al labour, a roc eskell d'ezo da nijal dreist fank ha spenn ar bed-mañ etrezek ar pezh a zo mat. « Lakaat a raent kroaz ar c'halvar war an ilizoù, war ar bezioù, war an hentchoù e pep lec'h evit ma teuje ar Vretoned, o welet korf maro o Zalver, da anaout priz ar boan, o c'houtout eo ar boan an hini a ra an den. »

« Gant hon tadou koz ar Vretoned
Hor c'halon ouz maen Per'vae staget
Ha gwelloc'h staget n'eus ket er bed. »

Ne fell ket d'in diskleria ez ae pep tra, evit ar gwella, gwechall, en hor Breiz. Nann. Ar pezh hon eus skrivet amañ, n'eus ket pell, diwar-benn an Tad Maner, a ziskouez pegen izel oa kousezet en e amzer. Ha koulskoude, piou gredfe am dislavaret, pa lavarin eo en em zilet dounoc'h an droug, hirio, en hon touez eget neuze.

O, an dud a zo flouroc'h o doareoù, hirio, ha braoc'h da welet eus an dianvez, met en o c'halon, en o spered, en o buhez gwirion petra dalvezont ?

Pet ha pet n'o deus ket nac'het o feiz hag o gouenn ha torret evel-se ar mell burzudus o stage ouz ar vro hag an dud o devoa o maget ?

Klenved an amzer vremañ : al lorc'hentez, ar gounid arc'hant, ar youl da gaout plijadur en deus graet e reuz, mor ar bed dizoue a zo dirollet, avel an ifern en deus c'houezet, ha ti an ene, diäzezet, re allies, war an traëz, a zo het diskaret.

Bras eo an dismantr war dachenn ar feiz, war-dachenn Breiz.

N'eus ket kavet a-walc'h a dud a galon da stourm, da sklerijenna ha da entana o breudeur, ha setu perak e welomp, hirio an deiz, kement a yaouankizou, a dlie beza beunv an amzer da zont, o sevel d'ar vuhez, dizec'het, digristenet, divreizet ha ne zonzont nemet enno o-unan.

Peadra da veza ankeniet ha d'hon teurel d'an daoulin evit lavaret d'hor Patronez vat : « O mamm hor bro, O Anna galloudek meurhet, bezit silvidigez ho Pretoned, mirit o feiz, harpit o gizloù fur, roit d'ezo ar peoc'h, dre ho pedennoù santel. »

Pedomp, eun dra ret eo, met ouspenn labouromp. N'eo ket kristenien vat, Bretoned kuzet, krenerien eo a zo ezomm hirio, met tud anaoudek eus o c'hredennoù hag o gwirioù, goest da veza, e pep lec'h, haderien ar wirionez, difennourien ar gwir eneb ar gaou, en eur ger, ebetel.

L. BLEUNVEN.



Eur familh sent

HOR sent bras a Vreiz a zo deuet, ar c'halz anezo, eus familhou n'eo ket hepken kristen, met santel.

Evel-se sant Gwénolé, diazeour manati Landevenneg, a oa mab da Sant Fra-gant ha da Santez Gwenn, breur da Sant Jakut, da Sant Gwennog ha da Santez Klervia. An daou vreur, anavezet mat, e Leon, sant Majan, ha sant Gouesnou, o devoa evel tad ha mamm, sant Tudoghil ha santez Tudona ; sant Goulc'hen a oa mab da sant Glaoda ha da santez Gologwenn.

Sant Tugdual ha sant Samson, diazeourien daou eus hon eskoptiou breizat, Treger ha Dol, a oa ive o daou eus familhou sent : mamm sant Tugdual a oa he ano, santez Koupaia (anvet c'hoaz santez Pompea) hag he c'hoar, santez Seva. Sant Samson, hen, a reas da bemp eus e vreudeur mont d'ar gouent hag enori a reer ive evel sent, e dad Ammon, e vamm Anna, e contr Umbrapel, diou eus e voerebezed, Alfrella ha Dervella, houman d'he zro, mamm da sant Malo.

Ar pezh a skrivomp amañ warlerc'h a garfe lakaet dirak ho taoulagad eur familh all a zent : familh Sant Herve an dall.

Deomp a spered e penn kenta ar VI^{vet} kantved. Roue ar Franked, Kloviz, a zo nevez maro (Bloaz 511). Lezel a ra e rouantelezh gant pevar eus e vugale. Unan, Childebert, a renas e Pariz, hag e balez a deuas abred da veza ti an deskadurezh : skrivagnerien, tud gouiziek, a bep seurt, a gavo eno degemer mat !

Palez ar roue a zigoras, eun deiz, e zor d'eur barz breizat, e ano Hoarvian, eun den dreist da gana gwerzioù ha sonioù savet gantañ. Bez ez oa, war ar marc'had, eur c'hristen penn kil ha troad. Dont a rae eus an tu all d'ar mor, eus Kerne pe Gembre, argaset gant ar Saozon.

Epad pevar bloaz, dre e ijin hag e spered lemm, e raio dudi palez Childebert.

Met setu ma sav keuz gantañ da vro e gavel. Ma ro Childebert aotre d'ezañ e tistroio da Vreiz-Veur. Al lestr evit treuzi ar mor a gemero war aochou an Arvor... Bet d'ezañ an aotre goulennet, Hoarvian en em laka raktal en hent. Met eun nozvez, dre e gousk, eun ael d'ro d'ezañ da anaout eo bolontez Doue e chomfe hiviziken e Breiz-Izel hag e tlaezfe eno eur familh. Graet en doa e soñj, koulskoude, d'en em denna, eun deiz pe zeiz, en eur manati bennak evit echui e amzer. Petra d'ober bremañ ?

Hogen eur gemennadurezh dem-heñvel a oa bet roet ive, en eun doare burzudus, d'eur plac'h yaouank a Vreiz-Izel, he ano Rivanon. Emzivadeg, edo o chom, e bro Leon, e ti he contr, Rivoare. Prometet he doa ive da Zoue en em ouestla d'e servich. Met, evel m'oa bet graet da Hoarvian, eun all en doa ive diskleriet d'ezo e oa Youl Doue e timezje : « An den yaouank a gavi war da hent, pa z'i da gerc'hat dour d'ar feunteun, hennez eo an hini a zo dibabet d'it gant Doue ».

Hag an traou a c'hoarvezas, dres, evel m'oa bet lavaret d'ezo gant kannad Doue, e tal ar feunteun, tost da japel Landouzan, e parrez an Drennek, Hoarvian a en em gav gant Rivanon. Konta reont an eil d'egile an huiere o deus bet hag evel ma tegouezas gant ar priñs breizat, Konomor, tremen dre eno, an deiz-se, an istor a lavar e voent eureujet dirazañ ha dirak an contr Rivoare hag eur beleg.

Eus an dimezi-se eo e c'hanas sant Herve. Gouzout a rit e teuas dall war an douar. Abred e kollas e dad. O chom edo neuze e Trelaouenan, en eur c'harter anvet Keran.

Evit peurober he labour he-unan, Rivanon a lakeas he mabig er skol gant eur manac'h santel, deuet eus an Iwerzon, e ano Arzian. Goude beza bet dinec'het diouz he faotrig, ar vamm a soñjas en em denna he unan en eul lec'h distro. Herve, hen, a greske en oad hag e santelezh : eur mignon bihan, Gwlc'haran, a rene ar santig dall war hentehou Arvor. Diés e ve displega an holl draou burzudus a c'hoarvezas en e vuhez, tremenet, darn anezi war an hentehou, evit gloar Doue.

Eun deiz, e tegouez e Lanhouarne, c'hoant d'ezañ diazeza eno eur manati. Goulenn a ra eun dachennig douar digant eun den anvet Innok. Hemañ a jom, eun tamm, da vare'hata, rak ed a zo en e bark ha glaz eo c'hoaz : N'ho pet nec'h ebet a respont d'ezañ Sant Herve, ro d'in ar pezh a c'houlennan ha da vare an eost me a restaolo d'it kalz muioc'h eget ar pezh az peus aon d'a goll. Innok a asantas neuze. Troc'het e voe an ed e glaz ha berniet en disglao. Pa deuas miz eost e voe gwelet an dra souezus-mañ : an ed, bet medet e-glaz, a oa sec'het brao ; dornet e oant hag e taoljont teir gwech muioc'h a c'hreun eget an ed darevet er park.

Kaeroc'h a en em gavas, eur wech all, demdost da Lesneven. O tizrei eus Konsil Menez Breiz (er c'honsil m'oa bet eskunnuget ennañ ar priñs Konomor abalamour d'e dorfejou) sant Herve a rae hent gant sant Houardon, eskop Leon.

Pa oant digouezet, eun abardaez, e Koat-Elez, etre ar Folgōat hag an Drennek, e lavaras sant Houardon d'e gompagnun : « Ar vrud a zo, en digoll hag en dizro da veza bet ganet dall, ho peus an eurvad da welet bemdez ar baradoz digor dirazoc'h. Ha ne c'hellfec'h ket pedi Doue da rei d'in ar c'hras-se ive eur wech hepken, en va buhez ? » Hag an daou sant d'an daoulin da bedi a zevri ha setu, o burzud ! dorioù an neñv o tegeri, hag e weljont gant dudi sent ar baradoz, patriarched, ebestel, merzerien, kovesored, gwerchezed o tremen dirak o daoulagad, leun a elez endro d'ezo, en eur gana kantikou e-harz tron an Aotrou Doue. Pa voe echu ar weladenn-se an daou vignon a reas c'hoaz eur pennadig hent asamblez hag en em zispartias evit mont pep hini diouz e du, sant Houardon d'e eskopti, da Gastel, sant Herve, d'e vanati, da Lanhouarne, el lec'h ma tlie mervel prest goude.

**

Met e vuhez a ro d'comp da anaout c'hoaz daou eus e contred : Urfol ha Rivoare hag eur vaouez devot all, kar d'ezañ, Kristina he ano.

Sant Urfol a vevas, epad pell amzer, e-unan, e donderioù ar c'head bras, a c'holoe, gwechall, ar vro tro-war-dro da Blouvian. Sant Herve e deuas eun deiz, da welet e contr en e beniti hag eno e c'hoarvezas eun darvoud fentus a-walc'h.

Sant Urfol eur vintinvez, en doa bet ezomm da vont kuit eus ar gêr. Hogen, ehom a rae eun tammig labour da echui en eun dachenn. Herve hag e gompagnun bihan, Gwic'haran, a sternias an azenn hag, e herr amzer, e voe peure'hraet an dachenn.

Goudeze, hep sonjal e netra, e kasjont al loen da beuri war ribl ar c'hoad, e kichen. Met a-barz pell, eur bleiz a zailhas warnañ hag hel lazaz. Gwic'haran a voe ken spontet m'en em lakeas da youc'hal a-bouez penn.

Distroet diouz e bedennou, Herve a deuas da welet petra'oa a-nevez. Gwic'haran a gontas d'ezañ hag ar sant a zistroas da bedl. Kerkent, setu ar bleiz a-benn herr d'ar chapel a oa chomet digor. « Diwallit ! eme Wic'haran da Herve, emañ ar bleiz o vont d'oc'h. » — « N'eo ket c'hoant eber droug eo en deus, eme ar sant, ober vad eo. Krogit ennañ ha sternit anezañ e plas an azenn. » Gwic'haran a sentas hag ar bleiz deuet da veza doñv, a vevaz, hervez a gonter, er memes kraou gant deñved sant Urfol, hep ober droug ebet d'ezo, o chacha war an alar, o tougen bec'hioù, en eur ger, oc'h ober an holl labourioù a rae an azen.

Prest goude, sant Urfol a hentchas Herve da vont da gaout e vamm. Houmañ a oa dinerzet gant he finijennou hag Herve en doa c'hoant he gwelet, eur vech c'hoaz, oa dinerzet gant he finijennou hag Herve en doa c'hoant he gwelet, eur veck c'hoaz, araok ma kuitafe ar bed mañ...

An contr all da Herve a oa e ano Rivoare. Beva reas meur a vloaz e Lanrioul, war zouar Gwitevede. Diwezatoch ez eas war-zu ar c'huz-heol betek ar beg douar, deuet da veza, a c'houdevez, Lanrivoare. Hervez ar vrud, Rivoare a oa diskennet en Arvor e penn eur rummad Bretoned, bet merzeriet gant ar baganed, en abeg d'o feiz. En eñvor eus an darvoud eo bet miret o relegou en eur vered ispisial, meinnet penn da benn gant darou, ha n'ez er enni nemet goude beza lamet ar boutou. Ar vered souezus-se a zo e bourc'hadenn Lanrivoare. Anvet gant an dud « bered ar 7 mil, 7 kant, 7 ugent, ha 7 sant (seiz mil, seiz kant, seiz ugent, ha seiz), a skriver dre fazl : 7777.

Evel sant Urfol, Rivoare a reas eur maro santel, hag e voe enoret abred, evel sant, gant ar bobl.

Met sant Herve a en em bourchase d'e dro da vervel. Eun ael a roas d'ezañ da anaout n'en doa mui, nemet eun nebeut deizioù da jom war an douar. Kemenn a reas ar c'helou d'e venec'h. Demdost d'ar manati, oa en em dennet eur pennad a oa, e giniterv Kristina, a oa bet gwechall o terc'hel kompagnunez da Rivanon, mamm sant Herve. Pa glevas d'he zro edo he c'henderv e pred ar maro, e tiredas d'e welet. Daoulinet e-harz e dreid, an daelou en he daoulagad, e lavaras d'ezañ « O ! n'am lezit ket war ho lerc'h ! Goulennit d'in digant Doue ar c'hras da vont ganeoc'h d'ar baradoz. »

Eskob Kastel, kaset kelou d'ezañ, a deuas da rei da Herve eun absolvenn diweza. Nebeut goude e ene kaer a nijas d'ar baradoz. War an taol ive Kristina a goueze d'an douar, e kichen korf ar sant, hag a denne e huanad diweza.

Setu petra eo bet ar familh-se, bet enni kement a sent, skouer dispar evit familhou hor bro Breiz. Seblantout a ra beza laket da zont da wir diou werzenn ar c'hantig.

« Deski d'an holl beva gant santelez gant peoc'h hag euruset keit a bado o buhez. »

P. BATANY.



HOR SENT KOZ

e koun Bleun-Brug Kastell-Paol

Lavarit d'in 'ta, va Breudeur ker, Tregeriz,
Pere eo an dud veur hag an dud a iliz
A renas en hor bro, ken divrall, gwechall-goz
Kammedoù hon Tadoù, argaset gant ar Saoz ?
Piou a ziazezas war lein hon tosennoù
Ar parrezioù ken koant ha ker d'hor c'halonou ?
Piou ' lakeas frealz en o zec'hadeg trist
Hag o miras feal war hent an Aotrou Krist ?
Piou 'ta nemet menec'h ha sent, servijerien
Da Vestr an Neñv ha war eun dro brogarourien ?

**

Landreger, Lann santel, bro garet Sant Ewan,
Anavezet e Breiz-Izel gant pep unan,
Gouzout a rez pegen dleour ez eo da vrud
Da vab glan ha doujet Koupaia Iltud,
TUAL, an eskob meur a zalc'her da bedl
Gant gred, war c'hlannou glas ar stêr Yeodi !
Va Bro-Dreger, na pegen bras anaoudegez
Ne-zleez-te da gaout lvez 'vit madelez
An Aotrou Sant Tual a gasas bagadoù
E ziskiblen galonek dre da zouarou
Da zerc'hel lintrus en e sav goulou ar Feiz
Ha da ziwall start en he flom karantez Vreiz !

**

Pesketaer an Arvor, ' mesk e gerreg,
A gan meuleudioù Sant Gireg ;
Eflamm a beder war ribl al Leo-Draez,
Nerñ hag Ivi war ar maez ;
Ha war ar Menez Bre
E veuler Sant Herve.
Dre gement lec'h ma kerzomp-ni
D'hor Sent ez eus bet savet ti :
Iliz kaer, chapel goant pe beniti dister
Pintet war an dorgenn, biz o c'hloc'hdi en aer
Pe damguzet e-touez ar gwez-tilh hag an onn
E sioulder baradozel eun draonienn don.

**

Sent koz karet a Vro-Dreger,
Gwazed Doue a ganmeuler
Pe Sent divrud ar chapelioù war ribl ar waz
Ha n'enorer siouaz nemet eur wech er bloaz,
C'houi eo tadoù ha diazeourien va Bro !
Eus lein ar Baradoz, ra vo
Troet ho sellou benniget.
D'hor c'haout e pep lec'h ha hepred !
Goulennit d'imp digant Roue an Neñv
Ma chomimp er bed-mañ a c'hlae'har
Ho tiskibien wirion war an douar.
Mibien ez omp d'ar Vro a garit eveldomp ;
Hor c'herent oc'h en Neñv : o, pedit evidomp !

Jakez KONAN.

(1) Er vro (Arvor Treger) e tistager : Sant C'hireg.

Kenavo Bastian

Spered Tregerz : ar zouc'h aour

NE 'z eus miz ebet ha ne fale'hfe ar maro unan pe unan eus gwella brogarourien Vreiz. O kas gantañ er bed all a nevez zo, Bastian, ar maro a ziskaras unan eus gwella kantikerien Breiz-Izel. Bastian a zo bet dreist holl kantiker.

A zegou, kantikou Bastian a zo bet moulet war Kentellou Sant Fransez hag ar Vuhez Kristen. Meur a hini a gaver ive e Kannad ar Galon Zakr.

Kalz anezo a zo bet laketa war follennou paper distag gant re all, ez eus bet savet leorigou bet advoulet.

Eun dibab kantigou (23 kantig - 48 pajenn). En Oriant e ti ar Bayon - heb bloavez.

Kantikou an Drede-Urz (23 p.). En Oriant e ti ar Bayon h. b. Eun eil mouladur (4 gantig). Ar Vuhez Kristen - Rosgo - 1943.

E levrig-dorn Trede-Urz Sant Fransez - Ar Vuhez kristen - Rosgo, ez eus daou gantig.

Ouspenn ar c'hantikou savet penn da benn gantañ e unan, Bastian a aozas meur a hini. Triwec'h a zo anezo e kantikou eskopti Kemper ha Léon (1945), gant e ano. P. Barnabé.

An darn-vuia eus e gantikou a zo sinet : Seb pe Bastien.

E ano oa Sebastien Hénaff. Ganet e Plogonneg e 1873, e studi a reas e Pont-e-Kroaz hag e Kloerdi Kemper. Belet e voe e 1901.

Goude beza bet kure e Graz-Gwingamp epad bloaz, e voe kure e Goanac'h (Gourmenec'h) (1902-1907). Da gabusin ez eas goudeze. E ano Tad a oa Barnabé. Misioner en Oriant 1907-1937, Tad gward 1931-1937, mervel a reas e Rosgo d'ar 4 a viz ebrel 1951.

Eno edo misioner abaoe ar bloavezh 1937. En tu all d'ar c'hantikou war gwirioneziou ar feiz ez eus deut eus e bluenn gwerzioù war follennou distag en enor da chapelou ha sent ar vro : Gwerz Sant Tugdual, g. sant Fiakr, g. Sant Justin, k. Itron Varia 'r Porzon, k. I.V. Douaneg (Gourmenec'h), I.V. ar Joa e parrez Penc'hann, h. a.

Pe lenner defe ar vadelez d'o c'hinnig d'in ?

Kanaouennou e save c'hoaz Bastian pa veze tro da enori hini pe hini eus e vignoned. O c'haout a zo diaesoc'h. Ken rouez eget ar re bet savet, a viskoaz, gant ar veleien hodet kenetrezo da zeiz eun oferenn nevez, eun dronidigez, eun hanterkantved bloavezh belegiaj.

Traouigou kentellou d'eur furcher koulskoude evit sevel istor hol lennegezh.

Meneg a zo bet gant « Bleun-Brug », eus an tamm kempenn graet gant Bastian da gantig brudet an Ao. Abjean « Da Feiz hon Tadou Koz ». Al lizer a zigase ar c'hempenn d'an aotr. Abjean a zo etre va daouarn. Plijout a ray, a gredan, d'hol lennerien gouzout petra skriva d'an 11 a viz here 1930 : « Le couplet incriminé a déjà été corrigé. Puisse mon petit travail te donner satisfaction et te permettre de mettre en valeur les gosières de tes Gaulois ».

An ton a zo hini ar c'hantig galleg : Sainte Religion. Bastian a ginnige eun diskan nevez :

« O Breiz, war sao, war sao !
N'emañ mui an amzer
Da gousket dibreder.
O Breiz, war sao, war sao !
Da stourm a-greiz kalon

Evit ar Feiz gwirion.
Feiz sakr ni ho karo
Ha deoc'h ni a zalc'h
Betek pal ar maro. »

Kinnig a rae ouspenn laketa e trede linenn ar pevare koublad : « Ne nac'hilmp birviken Feiz karet hor Gourdadou.

Hag er pempet : Kentoc'h eget plega d'an avel foll kounaret

An dero bras a dorr, hep chal gant ar maro. »

« Plega ne raimp morse, kentoc'h ni a dorro ». Pegit c'hoaz e kentellou an Tad Barnabé ar Vretoned gant e gantikou ? Hervez ma falvezo ganto delc'her da spered o gouenn. Gwall jagrin en dije bet m'en dije klevet, araok kimiada diouzomp, person eur barrez bet misioner gantañ, o tiskleria : « Er bloaz-mañ emañ echu gant ar c'hatekiz brezonek ; pedet oc'h da gaout peb a gantig gallek abenn ar bloaz a zeu. »

L. LOK.

Ar gemenerien, koulz hag ar vilinerien,
O doa gwechall ar vruñ da veza farserien.

Setu amañ, va zud, peseurt tro a c'hoarias unan anezo e Montroulez evit Fear an nec'h, hanter kant vloaz a zo.

Pep hini a oar eo Fear-an-nec'h Montroulez eur foar eus ar re vrasa tro war dro. Kalz a dud a zired eno ; tud diwar ar maez. Koz ha yaouank, bras ha bihan, a deu da welet « burzudou ker » epad an nebeut devezioù ma ya an traou en-dro. Evel ma c'hellit kredi e-touez kemend-all a dud en em gav unan bennak da veza troc'het e c'hodell d'ezañ gant al laeron ; hag evit en dra-se e weler war ar mogerioù, e pevar c'horn kêr, paperioù livet merket warno : « Attention aux pickpockets ». Diwallit ouz al laeron !

N'eo ket eun dro fall, evel-se, eo a fell d'in konta d'eoc'h : mes eun dro vras, ha na reas droug da zen ebet ; nemet e oa bet tapet mat eur c'heriad a gave d'ezañ edo o vont da ober eur marc'had talvoudus diwar goust eur paotr diwar ar maez. Hemañ avat a oa finoc'h eget na zebante d'ezañ beza.

Lan a reer anezan : n'ouzoun ket ma oa Lan e ano pe e lez-ano n'eus forz. Enor a rae d'e baeron, al louarn. Eun Tregeriad oa, o chom etre Plourin ha Lannecan.

Ha setu Lann o tont da ober e dro kêr gant e wreg Klaodina. Dont a raent e daou ; mes erruet e kêr pep hini a ya eus e gostez rak Lan ne felle ket d'ezañ kaout e wreg gantañ evit ober e droioulkamm. Setu perak e lavaras Klaodina d'he ozac'h : « Na jom ket re bell da : c'hlaourenni evel ma rez peurlvuia, rak ret eo d'eomp beza distro d'ar gêr araok an noz. »

— Ya, ya, eme Lan, hag e vin, kenavo emberr. »

**

Klaodina a oa aet d'ar c'hoc'hu da werza eun dousenn viou bennak ha da brena meur a dra evit ezommou he-zi.

Lan eus e gostez a oa aet da ober tro ar plasennou hag ar marc'hajou, en eur vare'hata, hag en eur jipotal, evit kavout an tu da gaout eul lipadenn bennak, hep dispign gweneg ebet, na prena ken nebeut.

War-dro kreisteiz en em gavas dirak stal eur orfebour e kichen an ti kêr hag e chomas eno dirak an darbenn-tal da zellout ouz ar braoigou a oa dirazañ hag en o zouez eur skritell a verke :

— « Ici on achète tout vieux objet d'or ou d'argent au cours du jour. »

Lan a yae eus eun tu d'egile, en eur ober van da zellout piz ouz an traou alaouret renket aze dirazañ.

An orfebour a-benn ar fin, en em c'houlennas, petra en doa Lan c'hoant da gaout hag a deuas war dreuz an nor :

— « Ac'hanta ! Paeron, emezañ, ha brao e kav-it-hu an traou amañ ?

— Ya, eme Lan, brao awalc'h int, met lavar d'in va faotr, te a bren, traou koz, alaouret pe arc'hantet ?

— Evel ma 'z eo skrivet war ar skritell a zo dirazoc'h, a lavaras an orfebour.

— Ha neuze, eme al louarn, pegement a rofes d'in evit eur souc'h aour ?

— Eur souc'h aour ! eme ar braoigour.

— Ya eur souc'h aour, pegement e rofes d'in evitañ ?

An orfebour a sonje en doa eur marc'had founnus da ober gant Lan hag a lavaras d'ezañ :

— Deuit en ti 'ta, gwelet e vo bremañk.

Ha setu Lan aet en ti, roet eur gador d'ezañ, da c'hortoz e dro, rak kalz tud a oa er stal.

Lan a zelle en dro d'ezañ ouz an horolajou a oa eno a-istreibilh da wellet pet eur e oa. Hini ebet ne verke ar memes eur.

— Dañ, eme Lan, pet eur eo 'ta ? Da horolajou a verk meur a eur ; pehini an hini vat ?

— Kreisteiz hanter eo, eme an orfebour.

— Petra lavares ? Kreisteiz-hanter ! ha me zo amañ o c'hortoz n'ouzoun ket petra ha va gwreg a zo moarvat o klask ac'hanoun da vont da lein. Poent eo d'in mont kuit ac'hann.

Hag e lavare Lan ar wirionez, evit eur wech Klaodina a glaske anezañ : — « E pelec'h an diaoul, eo aet hennez adarre ?... »

Mes an orfebour ne c'houlenne ket gwelout Lan o vont kuit araok beza diluiet e vare'had diwar-benn ar souc'h aour.

— Va den mat, emezañ, ret eo d'eoc'h chom da leina amañ ; pa vezimp ouz taol a vo aesoc'h komz etrezomp.

— Ya, ma karer, eme Lan, mes greomp buan, rak n'am eus ket kalz a amzer da goll, ha Klaodina a fell d'ezhi beza er gêr araok an noz.

Ha setu aet Lan ouz taol e ti an orfebour.

Evel-just hemañ a rae kalz a vitonaj, ha Lan a en em rae mitaouig gantañ. Goude ar souben, e teuas ar c'hig, patatez, ha me oar petra c'hoaz. Hag an evaj ne vanke ket a-dra-zur.

— Bremaik, bremaik... a lavare an orfebour, pa deue da Lan kregi diwar-benn ar souc'h aour.

Goude ar pred, 'vel ma c'hellit kredi e teuas ar c'hafe ha gwin-ardant e-harz, met al louarn a oule en em zerc'hel diouz re govad.

**

War dro div-eur e oa echuet ar pred ; hag e teuas an orfebour d'e labour.

— Ha bremañ, a lavaras da Lan, hag ar souc'h aour ?

— Ya, eme hemañ a benn ar fin, pegement a roit d'in evitañ ?

— Ha bras eo ?

— N'ouzoun ket, eme Lan !

— Ha pounner eo ?

— N'ouzoun ket ken nebeut !

— Hag hoc'h eus eur souc'h aour da werza ?

— Me ?... N'am eus ket ! eme Lan.

— Neuze, perak e c'houlennit diganin, pegement a rofen d'eoc'h evit eun dra ha n'hoc'h eus ket ?

— Diot a zo ac'hanout, eme Lan. Goulenn a ran an dra-se diganez betek gouzout e kavfen unan. Neuze, bez sur, e teuin d'az kwelout gantañ.

Ne lavaran ket d'eoc'h ma oa kourmaret an orfebour ; evel ma lavare Lan : « Perak ne laoskes ket ac'hanoun da beurechui ar pezh a lavaren d'it ? N'eus forz, Paotr ! Kenavo ar wech-all ha trugadez d'it ».

Pa en em gavas Lan gant Klaodina, houmañ a lavaras d'ezañ :

— E pelec'h out-te bet adarre o koll da amzer ?

— Koll va amzer ! Paotrez kaez, ro peoc'h d'in. Me am eus bet da leina, me lavar d'it. D'eomp d'ar gêr 'ta, hag e kontin d'it petra 'zo bet c'hoarvezet ganen e ti eun den a zoare ha n'oun ket prest da vont d'e welet a-dra-zur. »

BREUR CHARLEZ.



P'EDON oc'h ober va c'hoñje, du-hont e' Roazon, am boa graet anaoudegez gant eur paotr-yaouank eus a Blouziri hag ez c'amp chomet an daou vrasa kamarad epad hon amzer zoudard.

Setu eta, en deiz all, eur pennadig 'zo — e miz gwengolo e oa — en doa skrivet d'in eul lizer evit pedi ac'hanoun da vont da leina d'e di, deiz ar foar. « Me, emeve, va lein am bezo bemdez er gêr, friko avat n'am bezo ket bemdez ! » ha graet e zoñj gant ar paotr da vont da leina da Blouziri. Ha me kemeret va velo hag en hent.

N'ouzoun ket awalc'h dre belec'h oun tremenet met dreist Landerne oun aet atao. Feiz avat ! Setu me erruet a-benn va lein e ti va c'hamarad soudard. Ha 'dao ouz taol ! Friko oa bet, hag a-bep seurt ; ne livirin ket d'eoc'h petra, glaouenna a rafec'h moarvat.

Echu lein, yao hon-daou d'ar foar. Bez'e veze eno ivez foar ar yaouankizou, evel foar al Lukaz e Ploueskad pe ar foar Yen e Kastell. Erruet er bourc'h stagjomp da droideilat dre ar ruioù. Va c'hamarad a lavaras d'in : « Gouzout a rez, me 'zo o tarempred eur plac'h yaouank. » — « Rezon az peus, ar re all a ra ivez pa... c'hellont. » — « Ya, met eur gamaradez all a vez ganti, marteze e teufes ganeomp, asambles gant eben ! » — « O feiz avat, emeve, memes tra ! ». Anet eo d'eoc'h n'oa ket eno merc'hed ken koant hag ar re a zo wardro amañ ; petra 'fell d'eoc'h, gant ar pezh a vez e ranker ober !

War an dachenn e kaved kement c'hoariell a gaver e seurt foarion : « casse-cou, chenilles » ha me oar ! — « Ha ma 'z afemp war ar « radio-cars » ? » eme va c'hamarad. An dimezellet laouen bras. « O ! eme va ferlezeñn, me a zo o vont da goundi ! » — « Mat ! mat ! » emeve. Hag hi krog et « volant » ha tro er jabadao. Storioket e vezemp eus an eil tu d'egile mar doa eun druez... Evit lavaret berroc'h d'eoc'h, a-benn m'oa echu an abadenn e oa bloñset va fennou daoulin ha... kement 'zo, goude paea c'hoaz !

Bremañ, d'ar c'hafe ! eme ar merc'hed. N'oa ket da lavaret nann, evel just.

Dont a reas d'ilo an noz.

Padal, er vro-ze emañ ar c'hiz ive da ambroug ar merc'hed d'ar gêr ha da jom da goania mar plij. Feiz, avat, neo'het maro oan lakaet, eun tammig lent oun ha n'am boa ket graet ar-vicher-ze biskoaz.

E keit ha ma oa aet ar merc'hed da gerc'hed o veloioù e lavaras d'in va c'hamarad : « Gwasa pezh a zo, n'ez pezo ket da goan e ti hounnez hirio... » — « Petra 'n domenn, emeve, ober kazeg er wech kenta ? » — « Tra, tra, emezañ, biskoaz paotr yaouank n'en deus bet e goan en ti-ze. Met n'eo ket evelse emañ kont ; ma ne vez ket roet da goan d'it, deus da di va hini-me, eno e vezi degemeret mat. »

Deut ar merc'hed gant o veloioù, setu ni kazi-kazell etrezek ar gêr. Eur c'hard eur vale ha ni erruet en ti kenta. « Me a jomo amañ, eme va c'hamarad, te az peus da vont eun tammig pelloc'h. Diouz ma troio... ententet eo, hañ ? » — « Ya, ya ! emeve. »

Ha me en em gavet ivez, klevet am boa gant ar re goz emañ ar c'hiz serri an dorn d'an holl pa 'z aer evelse da goania en eun ti bennak. Ha me d'an eil goude egile ha serri an dorn d'ezo. N'oun ket gwall binvidik met savet mat avât !

Gant koan edod. « Mat, a zontis, ar re-mañ n'edont ket e soñj e teufe eur paotr yaouank da zigas ar vero'h d'ar gêr peogwir int staget atao gant o c'hoan ». Eun tamm sell ouz an daol : kig ha farz a oa ganto. Me avat, n'oun ket tik warnañ met ne gavan ket fall bep an amzer. Kenderc'hel a raent gant o c'hoan ha me ne veze ket lavaret d'in tostaat.

Re wir e oa eta komzou va c'hamarad... Goullo pe dost e oa ar gaoter ha me atao digor va genou ganen o sellet. Nebut a gomzou ivez avât ! Petra 'fell d'eoc'h, an tad ne gave ket aes kaozeal marteze gant e c'henou leun a gig ha farz !

« Ac'hañ 'ta, paotr ? emezañ pelloc'h, n'ez peus ket klevet pe briz a zo war ar chatal ? » — « Feiz tra, emeve, n'oun ket bet kalz en o zouez. Setu n'oun ket evit lavaret d'eoc'h. » — « Ha priz al leueou bihan, n'ez peus ket klevet kennebeut ! » — « Eo, eo ! en tu all da gant lur al lur. » — « O, ga, eme an tad, va amezeg en deus graet eun dervez avat ! Kompren'ta ! daou leue da werza ! » — « Daou leue, emeve, daon ! du-mañ ez eus pemp ! »

An Tonton a oa saoz hag a zavas e benn evit goulenn ouzin : « Pemp... pemp... leue bihan... diwar ar memes bloc'h ?

— Ya, ya ! emeve, pemp leue bihan diwar ar memes bloc'h.

— Met, emezañ, da vloc'h n'he deus nemet peder bronn evelato !

— Nann, nann, peder evel ar re all.

An Tad neuze a zavas e benn d'e dro hag a lavaras :

— Hag ar pempved neuze, penaos e ra ?

— Feiz, hennez a en em gav va zrb-me gantañ ; pa vez lonket pep tra gant ar re genta e vez graet eun dra bennak all evitañ ! »

M'hel lavar d'eoc'h, n'oa ket bet pell e oa gwelet ar merc'hed o lakaat ar billig war an tan hag o rouza an amann. Ha viou ha biftig warnañ !

Hag an tad a lavaras : « Tonton, digasit d'in amañ ar voutailhad gwin koz a zo dindan an armel. Lavaret am boa atao e tistoufjen hounnez pa zeufe eun den gouest awalc'h da zigas ar vero'h d'ar ger. »

Ha padal e oa me ar pabor !

Kontadenn savet gant Louis Marc,
eus ar Gostang e Ploueskad, bet displeget
e kenstrivadegou an Ykam. 1951.

PENN DU MET PAOTR FIN

Eun istor gwir-pater klevet gant eur misioner e bro ar vorianed : Selaouit :

Doue a grouas Adam, an den kenta ; eun den du e oa.

Rei a reas d'ezañ eur vaouez ; du e oa hi ivez.

Dont a reas d'ezo bugale : Kain hag Abel, du o daou eveljust.

Diwar an dud du-se, penaos e teuas er bed ar c'henta den gwenn ? Klevit kentoc'h :

Pa lazas Kain e vreur Abel, Doue a c'houlenas digantañ :

— Kain, e pelec'h emañ da vreur ?

— N'ouzoun ket, eme Kain, en eur grenn.

An Aotrou Doue a yeas droug ennañ hag a lavaras gant eur vouez spontus :

— Kain, e-pelec'h emañ da vreur Abel ?

O klevet ar vouez-se, Kain a voe ken spontet ma teuas da veza gwenn evel eun tamm lien.

Evelse eo e teuas er bed ar c'henta den gwenn. Makarfe Kain beza chomet du, eme ar Morian, ne vefemp ket bet hirio an deiz dindan galloud ar re wenn.

EMGANN AN TREGONT

DAoust ma ne vez ket pleustret kaiz, er skoliou, waz Istor Breiz n'eo ket dianav-krenn

« ...ar burzudou zo bet »

« Epad an amzer dremenet ».

Peogwir eo bet, a-viskoaz, Breiz ha Bro-C'hall stok an eil ouz eben, e rank ar mestr-skol e mod pe vod, ober meneg eus eur Breizad bennak. Ne c'hell ket konta d'e dudigou, Brezel ar C'hantvloaz, etre Gallaoued ha Saozon, hep leuskel ano Beltram Gwesklin, ar c'habiten brudet a oa bet e servich Roue ar Frañs. Hag e teu gantañ eur ger bennak diwar-benn Brezel Herez-Breiz, Brezel an diou Janed. Souez e vefe, neuze, ma tavfe war emgann brudet an Tregont. Koulskoude, amsklaer e chom an afer, e spered hiniennou.

Brezel Herez-Breiz a voe hir : tremen tri bloaz warn-ugent e padas, abaoe 1341 betek 1365 ; hir ha kriz, kement ma oa bet eur gwir walenn a gastiz evit ar Vretoned. Charlez Bleas ha Yann Monforz, a felle da bep hini anezo beza dug hag aotrou nemetañ e Breiz, n'o doa ket bet mez da c'houlenz sikour digant tud estren, Saozon diouz eun tu, Gallaoued diouz an tu all, soudarded a vicher holl, a rae freuz ha reuz, laouen ha dizamant, war zigarez beza feal d'o mistri. Ken diaes e veze stad an dud diwar ar maez ma sellas outo gant truez eun denjentil bennak. Eur marc'heg a Vreiz-Uhel, Yann Braomaner, eus Dinan, a oa kabiten e Josilin, en ano Charlez Bleas, a c'hounezas evel-se brud vras.

Tostik ouz Josilin, e Ploermel, edo eur c'habiten saoz, Ropars Bembro, a zaic'he evit Yann Monforz, hag a wallgase al labourerien-douar en eun doare kriz-mantrus. Yann Braomaner a c'houlenas outañ paouez. Refuzet d'ezañ e c'houlenz, e kinnigas d'ar Saoz en em ganna, evit gouzout gant piou e oa ar gwir : respont seven en doa bet an dro-mañ. Hervez boaziou an dud a vrezel, ne oa ket dizener d'ar c'habiten Bembro lakat kourerien ouz ar jadenn, evel chas, pe o laza war bouez taolioù baz ; mez, avat, e vije bet d'ezañ nac'h en em ganna gant eur marc'heg.

Dibabet e voe an deiz, deiz kent sul al Laetare, ar 26 a viz Meurzh 1351, hag al ieo'h : hanter-hent etre Ploermel ha Josilin, en eun dachennad lann ma save eur mell gwezenn dero. Divizet e oa bet e teuje peb a dregont soudard gant an daou gabiten ; rak-se, e voe anvet an abadenn : Emgann an Tregont.

Yann Braomaner a gemeras gantañ tregont Breizad, kofesaet, komuniet ha war yun. Hêl e oant bet en oferenn, kent mont diouz Josilin. Roparz Bembro, heñ, a zeuas en e gompagnunez, saozon, almanted ha flanked, na oant ket nec'het gant lezennou ar marc'hegle, na gant al lezenn gristen kennebeut.

Ar c'hrogad a badas pell, pevarzek den a voe laz, dek eus tu Bembro, hag heñ, unan anezo, pevar eus tu Braomaner, ha ne jomas hini na vije hep gloaz na goul. Darbet e voe da re Josilin plega, ha d'ar Saozon kemer o c'hreiz warno, daoust da varo o c'habiten. Gwilherm Montauban, avat, diwar e vare'h emgann, a lazas pevar saoz a daolioù lañs, a reas d'ar re all fallgaloni, hag a lakeas e-giz-se e vignoned da gaout an trec'h. E riskl bras, avat, e oant bet da goll o buhez pe o librentez. C'houec'h kant vloaz a zo er bloaz-mañ m'eo bet c'hoarvezet an darvoud-se.

Brud an emgann-ze a redas dre ar vro, hag a yeas da bell, kement ma oa enorus-tre beza bet e « Stourm an Tregont ». Ar brezel, avat, a gendalc'has, hag e kendale'has ivez Pipi Gouer gaez da veza gwasket ha gwallgaset gant ar soudarded.

REUN ARGANT.

PORZ-HOUARN KASTELL-PAOL

Bihan eo ar porz-houarn, bras avat an arc'hant a gouez ennan.

Lavaret ez eus bet ha lavaret e vo c'hoaz eo paour hor bro Breiz. Koulskoude...

Setu amañ ar pezh a lennomp e kazetenn micherourien an S.N.C.F. (Henchou-houarn Frans) « Notre métier, la vie du Rail » (miz c'huevren 1951) diwar-benn ar pouezus a labour a vez graet e porz-houarn Kastell-Paol e Bro-Leon.

Porz-houarn eus an trede klas gant eun hanter-kant pe wardro a vicherourien.

Eus an deiz kenta a c'henver betek an deiz kenta a gerzu eus ar bloavezh 1950 ez eus loc'het eus a Kastell 17.150 bagon, 7.000 bagoniad briki (31.000 tonel) 7.000 atrichaot (37.500 tonel) 3.000 bagoniad avalou-douar, ognon, karotez (wardro 22.500 tonel).

N'eo ket gwall aes c'hoari gant al linenn etre Kastell ha Montroulez peogwir n'eus nemet eul linenn el lec'h an diou a gaver peurluia. N'heller ket eta ober mont-dont asambles gant an trenioù. Daou rummad trenioù a loc'h herdez, unan da greisteiz-hanter gant unan, daou pe dri dren hervez an ezommou ; eur rummad all etre 21 eur ha 24. Dervezioù a zo e ranker evelse kas betek 200 ha 250 bagon da Vontroulez hag e ranker sternia 4 pe 6 marc'h-du d'ar c'greisteiz, hag eun dek bennak diouz an noz. 400 pe 500 bagon (goullo pe leun) a c'hoari mont-dont er memes dervez ha betek 32 tren o vont pe o tont.

Ar vare'hadourez a vez kaset d'eur c'hantad kêr bennak er Frañs pe e diavaez-bro.

Eur pennad a zo ne vez dale ebet evit treuzi harzoù ar vro evit mont er Belgig pe en Alamania. Ar valouterien a wel ar vare'hadourez e Kastell araok an diblas hag ar bagonioù a vez prennet gant plom ; arsav ebet, nemet er c'hêrioù harz hag evelse e c'hounezher 10 ha 12 eur.

Bep bloaz eta e vez sammet gant an trenioù 100 pe 120.000 tonel legumaj e gar Kastell.

Er bloavezh 1949 ez eus kouezet e ket porz-houarn Kastell-Paol 510 milion a arc'hant (44.360 beajour, 16.376 bagon karget o vont kuit ha 6.291 bagon karget o tigouezont). Netra nemet e miz Ebrel ez eus kouezet 82 milion ha netra nemet en eun dervez eus ar miz-se, 7 milion.

A hend-all e ouzomp he deus gouezet an S.N.C.F. dre ar Frans a-bez 4.030 milion gant ar vare'hadourez kaset er berra amzer (régime accéléré) epad miz Ebrel 1950. Setu eta e c'hellomp lavaret en deus porz-houarn Kastell gouezet 2 dre gant eus gounidoù an S.N.C.F. a bez war ar vare'hadourez kaset er berra amzer epad miz Ebrel 1950 ! Kontomp bremañ war ar bloavezh a-bez, en eur denna an 10 milion bennak a deu diwar goust ar beajourien hag e chom gwir c'hoaz e kouez e Kastell 1,04 dre gant eus holl gounidoù ar S.N.C.F. epad ar bloaz war ar vare'hadourez kaset er berra amzer.

Evit eur gar eus an trede klas n'eo ket fall !

Arabat eo kredi e vefe kaset dre houarn an doll vare'hadourez. Bemdez ez a ivez kirri-dre dan, bras eston, warzu eur bern kêrioù all. Ezomm ebet da garga-diskarga nag e Kastell nag er c'ho'hou pe e tiez ar gwerzerien.

Ha dre vor 'ta ! 20.000 tonel eus a Rozko er bloavezh 1949. Bez ez eus trenioù ivez hag a ya war eeun eus a Kastell da Londrez ; Treuzi a reont ar mor war bagonioù graet a-ratoz evit kement-se (ferry-boat). Gant ober 56 eur hent ez eont eus a Kastell da Londrez.

Setu aze hag a ziskouez d'eoc'h eun tammig petra eo kenwerz al legumaj e Bro Kastell.

V. FAVE.

KEMENER ? MILINER ?

ECHU ganit da amzer-skol, va faotr. Euruz out 'vel ar Spered-Santel, sur. Hag e kav dit ez out mat da gas karr ? Met, marteze, emañ o vont da dañva bremañ eur zoubenn trenko'h eget hini an ibil dero. (Daoust m'eo dreist lakaat eun ibil dero el lambig!) Treñk e vo da zoubenn, dreist-holl ma'z out ganet da zadorn goude ar c'hrampouez-gwiniz, ma n'ouez,

Na bu, na ba,
Na sou, na dic'ha,
Nemet eya laez
Ha debri yod d'e lakaat er-maez.

Petra 'ri ?... Ken diaes kaout eur respont diganit ha tenna amann eus gouzoug eur c'hi. Dit da zibab eur vicher. Gra mat da zoñj. Na vez ket eus ar re-ze hag a zav kestall el loar, a gav primoc'h eun neiz pig, eget eun houarn-marc'h dirak beg o botez. Ha berr ar peuri ganto goude.

Ret eo gortoz ar c'haol da boaza (t),
Pa vez c'hoant d'ober soubenn vat.

Selaou 'ta kentelioù ar re goz diwar-benn ar micherioù ha n'o laka ket e skouarn ar c'had. Kentelioù flemmus ez int, o tisplega kentoc'h perziou-fall ar vicherourien eget o ferzioù-mat. Pebr da lonka, muioc'h eget a wrizioù pour.

Micherourien 'zo hag a oa brud ganto dreist ar re all : ar gemenerien hag ar vilinerien.

Enor da genta d'ar gemenerien, ret nao anezo 'vit ober eun den. Ha c'hoaz,

N'eo ket eun den,
Met kemener ha netra ken.

laer krampouez kras, amann druz warno... Ha boued an ifern : rak
Ar c'hemener pa gouez a ziwar e dorchenn

A gouez rag-eeun en ifern.

Gwechall ez ae ar gemenerien da labourat war-maez. Azeza 'raent en doare... kemener, war eun dorchenn-blouz. Ha gwriat, gwriat. Dezo 'veze roet boued gwelloc'h eget da dud an ti. Avius e veze ar re-mañ eun tammig.

Ha pa varvo ar c'hemener ?

Lakait 'nezañ en douar kerc'h
Ha chas ar barrez war e lerc'h.

Eul laer bras all (gouez d'ar re goz) e vefe ar miliner.

« N'eus ket taeroc'h eget roched eur miliner,
Rak pep mintin e pak eul laer ! »

Hogen, ha milinerien 'zo c'hoaz e Breiz pe e Bro-C'hall ? Kazi-sur n'ez eus gour ebet ken, peogwir,

Diweza miliner a welis
A oa ouz ar groug e Paris.

Danvez 'vit tan Paolig an diaoul, eveljust :

Eur miliner, laer ar bleud
A vo daonet betek e veud.

Ac'hanta, mab, beg figus a rez ? Ne vi na miliner na kemener ?...

O ! kana 'ra ar skirih ousepenn er villin pe er stal-vezer. Hag arc'hant a zeu d'e heul evel da heul ar c'haz du.

Met, ha pinvidik-mor e vefes, arabat dit lakaat an tan e daou benn da c'houlourousig. Ha nebeutoc'h c'hoaz ma n'emañ ket ganit an aour war ar raden. A-hend-all ez ay buan da stal da stalig, ha da stalig a zeu da veza Kernetra.

KAOURINTIN RIOU.

EUN TORAD LABOUSED

MAI-JOZ he doa dibabet ar viou brava da lakaat d'ar yar-c'hor gwella. A-benn o amzer e teuas eus o c'hlorenn eiz boulig : seiz gwenn-melen, hag unan voulouz du, gant paoliou munut, eur begig atao digor, pe'vit debri, pe'vit gouleann boued pe loj.

Ret e voe dispartia al loenedigou dister, diouz ar yer bras, hag o defe friket anezo dindan o faoliou prim, pe wallgaset a daolieu beg didruez « tud kreñv ». Kaset e voe 'ta ar vamm-yar hag he zorad war leurenn an teat, e-kichen ar c'hlas vras. Aze 'oa sioul kaer d'al labousedigou.

Int avat ne oant ket didrouz. Nag a « biou-piou » a glevas d'ar mare-se eiz paotr ar « santifikad »... hag ar re all ivez ! Gwir eo n'o doa ket re a amzer da selaou gwikadennou. Rak bec'h a oa warno gant o labour. Nag a draou, didalvoud-kaer alies, a zo da enfornia, da vounta e penn ar grennarded kondaonet da vont d'an testeni-a-studi !...

**

Distroomp da sellout ouz al laboused dibreder o wikal e-kichen o mamm atao war evez. Houmañ a rann dezo ar riz, ar bruzup (ar « breuyenn » evel ma lavarer amañ). Pa yudont re e tastum anezo dindan he diouaskell en eur gana eul luskellerez. Hag i a ziskan « Gwik ; gwik ! » betek ma'z int morgousket. Met setu unan, daou, tri, tomm dezo e-touez ar plu, hag a ziskoach o fenn, hag a sell, bliou hag eurus, ouz an tremener... Ne vint morse pevarzek vloaz ; n'o do santifikad ebet da vont da gere'hat da Blogastell !... Unan a varvas, eur c'har torret.

**

Pa veze brao an amzer ; e vezent kaset d'ar « skol-vugaligou », eur porzig savet evito, broued-orjal en-dro dezhañ, e-kichen ar porz-ye. Bez' e c'helle ar re vihan tremen da genta dre ar « ridoj-houarn » ha mont da bourmen el liorz, e koad ar « gwez-bras-kaol ». Met ar yar hi, hag a ranke chom er porzig, a c'halve anezo a vare da vare. Hag i da zistrei neuze en he c'hichen, evit lonka prim eun tamm preñv bennak dizoloet gant o mamm goude eun taol diskrap.

**

Met ar c'hig tener-se a blij d'ar razed. Hag eun deiz m'edo Mai-Joz o c'houennat karotez, e klevas-hi eur wikadenn. Ha d'an abardaez, kaer he doe konta, adkonta : ne oa mui nemet c'houec'h labous. Met gwelout a reas eur raz bras o redek war ar voger. Stignet e voe gripedou, stanket an toullou. Eur raz, skaotet gant dour hero, a chomas da guzat en eur c'han dour lous. Brudet e voe gant eur vaz houarn, mokedet gant tan paper. Ken e rankas dont er-maez. Hañ ! eun taol trojenn : Torret an drojenn ! « Gwik gwik ! » Pañ ! eun taol botez : Ha setu astennet mik an enebour marlonk !

Ne oa ket echu gwalleuriou an torad. E-pad ar c'hlas, e klevas ar skolaer ragach bras war-du porz ar yer. Petra' welas ? Eur vran o klask sach a ganti eul lahousig. Ne c'hellas ket dont a-benn eus he zaol. Met mac'hagnet he doe gouzoug al loenig hag a varvas.

**

Hag an testeni-a-studi ? Dont a reas an devez. Daoust d'ar razed, d'ar brini ha d'al laboused. Kredi' rit er sinou fall ? Petra' c'hoarvezfe gant an eiz skoliad ? Ha gwelloc'h ez afe an traou ganto eget gant eiz labous an torad ?...

D'an abardaez e tistroas an eiz paotr eus Plogastell. Unan en doa sammet ar yod a-bez. Hag ar seiz all ? O, ar seiz all : Bleunniou ouz o marc'hou-houarn (a-dreñv-hag a-raok !) sigarettennou en o chakod hag en o beg, tomm an heol ganto eun tammig, setu ma oant deut da veza brasa, kaera ha speredeka krouadurien an Aotrou Doue benniget !

Ha kouiskoude, ret eo diskleria an traou penn-da-benn, bet ea bet war darn anezo, d'ar mintin, eul liou ! Ya, liou ar grampeuzenn genta.

Met bremañ ! « A, paotr paour, ni zo gwazed, pabored ! » Eus an hini bras penn du betek an hini fall bleo ruz.

**


Mai-Joz he deus lakaet viou d'eur yar all.

K. RIOU (17-6-51).

Da eured al laouenanig



Da eured al laoue-na-nig, o ge ! Da eured al laou-



e-na-nig, An ozac'h a zo bi-ha-nig, o ge ! An



ozac'h a zo bi-ha-nik

1 - Da eured al Laouenanig, o ge !

Da eured al Laouenanig,

An ozac'h a zo bihanik, o ge !

An ozac'h a zo bihanik.

2 - Kaset en deus ar goulmig wenn
Da ober en pep lec'h pedenn :

3 - Deut pep hini gant eun draig,
Rak siouaz ! n'eo ket pinvidik.

4 - Me 'yelo, eme ar c'hilhog
Hag a gano kaer en araok.

5 - Me 'yel ivez, eme ar Vran
Me'gaso ganin eur c'hef-tan.

6 - Me 'yel ivez, eme ar Frav,
Hag a gaso ganin bara.

7 - Me 'yel ivez, eme ar Big,
Me gaso ganin eur pezh kig.

8 - Me 'yel ivez, 'me ar Gegin,
Hag a gaso eur podad gwin.

9 - Me 'yel ivez, 'me 'r C'hefeleg,
Hag a raio koant ar beleg.

10 - Me 'yel ivez, 'me ar Gougoug
Gant va zaboulin war va choug.

11 - Me 'yel ivez, 'me an eostig,
Hag a gano meur a sonig.

12 - Me 'yel ivez 'me 'n alc'houeder,
Hag a gano a-us d'ar stér.

13 - Me 'yel ivez 'me ar pabor
Hag a gano e-tal an nor.

14 - Me 'yel ivez, 'me 'r wennili
Hag a gano war lein an ti.

15 - Me 'yel ivez 'me ar pennglaou,
An dred ha me a yel hon daou.

16 - Me 'yel ivez, 'me ar pintik,
Me yelo gant an houperik.

17 - An holl evned en em gavas,
Nemet an erer ne zeuas.

(1)

Son brezonek koz
Evit an ton, sell. ouz
Kañnamb bugale ! paj. 36.

(1) Perak ne zeuas ket an erer ? Dre ma oa gwarizi ennañ ouz al Laouenanig, abaoe ma oa bet diskleriet hemañ roue bihan an evned.

DRE VREIZ HA DRE AR BED

ABADENNOU AL LEVEZ

DIWEZA « abadenn al levez » a zo bet graet e Brasparz, evit eskopti Kemper. Fellout a ra d'in lavarout amañ va sonj evel ma rafe n'eus forz pehini eus ar selaouerien.

E Pont-e-Kroaz oun bet ivez. Leun-kouch e oa ar sal, daoust d'ezhi beza bras : Kalz a yaouankizou, eun nebeut re goz ha ne oant ket an nebeuta laouen.

Skoet omp bet gant perziou mat an danvez a zo bet choazet ha roet war al leur-c'hoari. Lezet e oa bet a gostez an traou dister, didalvoud, falz santimantal. Pep tra a verite beza klevet. Aet eo ar maout, avat, gant ar re o deus kanet pe kontet e brezoneg : blaz ar vro a oa ganto, eur vlaz c'houek, plijus ha gwirion a skoe war eun spered ha kalon ar selaouerien. Soniou ha kontadennoù ar vro a zo beo, a-dra-sur. Ganto ar sal a drid, a lamm gant levez.

Er c'hontrol, traou all, kaer ivez marteze, met deuet eus al lec'h all, pe tennet eus levriou, n'int ket ken beo, ken birvidik hag an traou difluket anezo o unan diwar teñzor pinvidik-mor hor parrezioù breizat.

Petra eo « balledou » da skouer, e-keñver hor jabadao ? Kaer a-walc'h, marteze, met n'eus enno na buhez, na nerz, na yaouankiz, na freskder evel en hon dansoù breizek. Re studiet int, evit beza ar vuhez, re c'houstad evit beza nerzus.

Koulskoude, tomm e oa ar sal, ha tomm kenañ. Amañ c'hoaz, muioc'h eget e Pont-e-Kroaz eo bet laketao splann talvoudegezh ar peziou brezonek war ar re c'hallek, chomet pell-pell warlerc'h, evit ar c'han koulz hag evit ar c'honta.

Da genta, daou ganer eus Plougastell, gwisket kaer-tre, o deus kanet « An daou Varz ». Ar ganaouenn n'eo ket nevez, met an doare d'he c'hana a zo nevez penn-da-benn. Ouspenn, eun ton nevez a zo bet implijet ganto, eur c'houblad war daou. Ne c'helle ket ar gantoùenn beza klaset o veza ma oa eun « duo ». Anez e vefe aet ganti ar priz kenta.

Evit al lazou-kana (chorales) eo aet ar maout gant kanerien Bro-Pont-e-Kroaz, gant « Kleier va bro ».

An eil priz a zo aet gant eur pezh kana gallek : « l'Alpée », hag en doa perziou mat. Ar c'han a vefe bet deuet gwelloc'h m'o defe ar ganerien sonjet beza, e gwirionez, kourerien eus Bro-Savoie, o kana e-kreiz ar menezioù bras.

Evit ar c'hontadennoù, Louis Lochoux, gant « Ar penmoe'h dirollet » savet ha kontet gantañ, en deus, e gwirionez, dirollet ivez ar sal, ha dihradet kaer ar priz kenta. A ! va zudou ! betek kaout poan gof e c'hoarze an dud. Emichañs ec'h asanto an oberour skriva d'eomp e varvaill evit lennerien « Bleun-Brug ».

« An diaoul er baner sivi » a zo aet gantañ an eil priz. Marvailhou all ha kanaouennoù all a zo bet c'hoaz. Re hir a vefe d'eomp komz eus pep hini.

Ar « Bleun-Brug » hag a zo e bal difenn ar brezoneg, en deus kinniget daou briz kaer d'an daou genta evit ar c'han hag ar c'honta e brezoneg : diou statu eus Santez Anna. Ha laouen omp amañ o kinnig d'ezo, ha d'ar re holl eus an Y.K.A.M. (J.A.C.) hag a zalc'h mat atao da yez hon tadou, hor gwella gourc'hemennou.

B. P.

Pedi a reomp an holl yaouankizou o deus kemeret perz e « abadennou al levez » (coupes de la joie) da zont adarre da zisplega ha da gana e kenstrivadegoù Bleun-Brug Santez-Anna.

PRIZIOU ABADENN AL LEVEZ

I) KONTA : la priz : Louis LOCHOU, eus Loperet, gant « ar Penmoe'h dirollet » — Eil priz : Michel LABASK, eus Kernilis, gant « an diaoul er baner sivi ».

II) KANA : la priz : Yves CAM, eus Spezet, gant « Son ma bro ». — Eil priz : Yves GLOAGUEN eus Meillac, gant « An teodou fall ».

III) LAZ-KANA Mahalon, priz kenta gant « Kleier va bro ».

KELOU LAOUE

Deuet eo betek ennomp, ar c'helou laouen, eo bet eurejet, d'ar 14 a viz Ebrel diweza, hor mignon ha madoberour mat an ao. Youenn Souffès-Despré, kabiten, eus Guipavas, gant an Dimezell Glaodina Guillard, eus « Arc-en-Barrois », Marn-Uhel. — Hor gwella gourc'hemennou breizek d'an daou bried nevez.

RADIO KIMERC'H

Darn eus ar vugale o deus bet prizioù kenta e Bleun-Brug Kastell-Paol ha Lokorn, o deus kanet ha kontet e Radio Kimerc'h er sulioù tremenet. Nag a foug e oa er vugale-se, hag en o familhou, o klevet o mouez ! Yannig Célton eus Treboul, dreist-holl, a zo distagellet mat e deod ; plijadur a vefe ouz e glevet alies. — Yaouankizou ar C'hap ha re all, bet d'ezo prizioù e « abadennou al levez », a zo bet klevet ivez o mouez e Radio-Kimerc'h. Dieour omp a gement-se da Ber Helias, hag a oar kas ken brao en-dro abadennou Kimerc'h. Bennoz Doue ha meuleudi d'ezañ.

GOUEL AR YAOUANKIZOU KRISTEN E GWITALMEZE

Lun ar Pantekost ar bloaz-mañ he deus gwelet eur gouel kaer e Gwitalmeze. O komz diwar e benn an Aotrou N'Eskob Fauvel a dlie lavaret n'en doa gwelet morse gouel all ebet ken devot ha ken urziet mat.

Ar pezh en deus sikouret ar gouel da veza kaer, da genta, eo an heol tomm, en deus taolet e sked er c'halonou, koulz ha war bep tra.

Kaer eo bet ar gouel dre an doare ijinus m'oa fichet tachenn ar vodadeg, an aoter hag holl diez ar vourc'h, kaer dre an niver ken bras a dud yaouank, diredet eus pevar c'horn an eskopti, tost da zek mil den anezo. Met an dra gaera moarvat eo bet an testenit dispar a feiz roet gant ouspenn daou vil anezo, a gomunias epad an oferenn bred, o tiskouez dre eno e pelec'h e fell d'ezo kemeret nerz da oher ar vad a c'hortoz an Iliz diganto.

En eur gouel ha ne vode nemet tud diwar ar miz, tud, hag a gomz bemdez ar brezoneg, e kavomp eo bet, siouaz, gwall vihan ar plas roet d'hor yez.

L. B.

PEZ N'OUZOC'H KET

Pet a gatoliked a zo er bed a-bez ? Hervez ar sifrou roet gant ar Vatikan ez eus pevar c'hant milion a gatoliked dre ar bed, diou wech muioc'h eget a Brotes-tanted, a zo daou c'hant daou vilion anezo. A-hend-all, niver an Ortodoksed a zo kant tri ugent milion ; ar Vuzulmaned, tri c'hant milion ; ar Voudisted, kant ugent milion.

GOUDE AN ETNA, AR VULKAN

Eur menez-tan eo ar Vulkan, en enezennou ar C'hap Gwer, war aochou Afrika. Keusket a rae abaoe daou c'hant vloaz. Met dihunet eo e kreiz miz mezeven, o teurel flammou a sav betek kant metr uhelder, ha moged betek 9.000 metr uhelder.

An enezenn m'emañ ar Vulkan enni, a zo anvet Enez an Tan : evit eur wech eo gwir mat.

BREZEL BIHAN AR PETROL

Emañ Bro-Saoz en eur pleg diaes gant afer ar petrol en Iran. Betek bremañ eo an Iran a roe da Vro Saoz al lodenn vrasa eus ar petrol he devoa ezomm. Tud London, fin ha speredek bepred, o devoa savet eur c'hevredad (company) bras : an Anglo-Iranian Company, evit oher du-hont war dro an eoul-maen.

Met setu taol-ouza-taol, darvoudou bras en Iran : ar Gambr o vota perc'henniez ar vro war an eoul-maen, hag o vroadelaat (nationaliser) an Anglo-Iranian Com-pany ; ar ministr kenta a-du gant ar Saozon, lazeta ; eur ministr all, an Doktor Mossadegh, o tont en e lec'h, hag heñ a-enep ar Saozon ; ar studierien hag ar vicherourien o sevel hag oc'h ober trouz ; an traou o trenka muioc'h mui.

Daoust hag e kavo Bro Saoz an tu da chom en Iran ? N'eo ket sur. Rak Iraniz a seblant aheurt-kaer...

Evel just ne lavar ket ar c'hazetennoù pep tra diwar benn an afer-se. Mar bije gouvezet hiroc'h, e vefe anat marteze n'o deus ket ar Saozon c'hoariet bepred gant pep lealded e-keñver ar re all.

BREZEL KOREA O PAOUEZ ?

Er wech-mañ ez eus kaoz da vat da echui gant ar brezel e Bro-Gorea. Gwell a se, keit 'zo m'emañ an dud o'n em daga du-hont. Tud Bro-Sina a vefe skuiz, hervez klevet, goude kement a soudarded kollet ganto. Tud ar Broadou unanet a vefe int ivez ken laouen all o welout an emgann o tistana rak koustus eo ar brezel.

Ar bed a dro
An eur a sko
Ar yer a skrab ato.

KORN AL LIZIRI

... « Ar pajennou « dre Vreiz ha dre ar bed » a zo plijus d'an holl; (d'am meno, d'an nebeuta goude beza divizet gant meur a zen, er Senegal, e Paris, pe e Breiz-Izel bremañ), ha ret eo embann anezo e pep niverenn, hep mank. Ar pajennou-se a vank en niverenn 37 ha gwaz-a-se.

Mat eo kaout, er Bleun-Brug, eur bajenn pe zlou evit ar vugale, gant skeudennou. O veza m'eo ken ker ar skeudenna, e vefe tu, marteze, d'en em glevet gant tud hag a embann levrougou evit bugale, da skouer : « Cœur Vaillant » hag all...

Mat e vefe kaout ivez, eur bajenn pe zlou diwar-benn ar c'hiz, evit ar plac'hed hag ar merc'hed. — Me a oar mat, n'eo mui heuliet giz koz Breiz-Izel, nemet er gouelioù hag er pardonioù. Koulskoude, e vefe plijus, sur-a-walc'h, d'ar plac'hed ha d'ar merc'hed kaout eun dra bennak diwarbenn ar vionderez, an dantelez, ar c'hinkladurioù giz Breiz, evel ma rae « Emlad » n'eus ket pell.

Mat e vefe kaout atao en ho kelaouenn, eur gontadenn farsus a zlou bajennad, diembann, evel re an Tad Médard — Arabat rei troidigezioù, n'eus forz pegen brao e vefent, nag istorioù kontet, diskontet, adkontet hag anavezet gant an holl.

Arabat, d'am meno, embann re a zoniou hag a gantikou ; unan e pep niverenn a ve a-walc'h, gant ar muzig.

Er bajenn « Dre Vreiz ha dre ar Bed » rei keleier eus ho koumananterien, evel ma ra « Al liamm » hag « Ar Soner »...

Dr LAURENT.

Setu eul lizer mat. D'al lennerien d'hor sikour, ma c'hellimp seveni kement a c'houlenn al lizer-se. Kasit d'eomp keleier ha pennadoù evit « Bleun-Brug » — Gortoz a reomp digant ar merc'hed, eun dra bennak diwar-benn ar c'hiz.

LEVRIOU NEVEZ

Eul levrig koant kanaouennou a zo deuet d'eomp : « Digor an abadenn », gant Cheun ar C'hann. Evel ma lavar Jef Penven, en eur zigeri al levr : « Eur skouer dispar eo al levrig-mañ war meur a boent... Ret e vefe kaout, e kalz parrezioù, tud, evel Cheun ar C'hann, ec'h anaout ken brao ene e gorn-bro ha ken barrek hag heñ war sonerezh ha barzoniezh ar bobl ».

Evit kaout al levrig, skriva da : B.A.L.B. Boîte postale 108 Rennes.

Bet hon eus ivez, eur pennadig a zo, eun dastummad lennadurioù, evit ar skolioù : Daou ugent pennad lenn, dastumet gant Keravel hag embannet gant : « mouladurioù skol ar brezoneg ». Ennañ e vez kavet pennadoù mat-tre diwar bluenn hor gwella skrivagnerien. Brezoneg yac'h-pesk, plijus ha poblek ; peadra da zuna gwir vouedenn hor yez. Meuleudi d'an oberour.

Evit kaout al levr, skriva da : M. Keravel, « Skol ar brezoneg » Dirinon, Finistère.

Kelaouenn hor Mignoned « Bro Guened » a vraoa ivez he stumm. Skeudennet ha moulet brao, gant al liesskriverez, eo plijus da lenn. Karout a rafemp kaout enni, marteze, muioc'h a wenedeg. — Koumanant bloaz : 100 lur : Abbé Palud, Dir. Grand Séminaire, Vannes, C.C.P. 1158-46, Nantes.

Niverenn genta, eur gelaouenn all, e gwenedeg, a zo deuet betek ennomp : « En Had ». Buhez hir ha kalz lennerien d'ar gelaouenn nevez. Koumanant bloaz : 300 lur. Renner Sten Kidna, 5, rue du Drezen, Auray, Morbihan. C.C.P. 591-85 Nantes

BIBLIOTHEQUE
QUIMPER
DIOCESAINE

Kas an dorz d'ar gêr

Foar Bloneour a oa oc'h echui...

An amzer a oa fall, avel ha glao, ken e fuste. Hag an dud a glaske hent ar gêr, tiz warno. An noz ive a oa o tont...

Abaoe ar mintin, eur glazig droch, eur pezh lanken, moan evel eur vaz kloued ha treut evel an Ankou a droienne war blasenn ar zaout, o klask prena eul loen bennak.

Siouaz d'ezañ ! echui a reas ar foar ha n'en devoa graet prenadenn ebet c'hoaz. Me bari e oa ar pôtr re dost d'e wenneien.

Bouzelenn voan en doa graet ive hed an de, rak e verenn a oa chomet a-ispilh gant ar c'hoant prena. Setu hon den o tizrei d'ar gêr war e dreid, ar c'hirri dre dan o veza kemeret o hent pell oa. Koulskoude, eur sac'h goullou n'eo ket evit

chom en e sav ha nebeutoc'h c'hoaz bale. Ha setu hen da brena daou lur vara hag eun nebeut silzigennou. Hag en eur vont gant e hent, ar c'hêz den, du gant an naon, a gerze founnus, en noz teñval, dindan ar c'haouajou druz, en eur lonka kalonek an tamm bouetañ en doa prenet.

Gant e veud kleiz e talc'he ar silzigennou war ar bara ha gant eur gountel en e zorn dehou, e tiskolpe tammou eus o dorz hag e troc'he pastelloù silzig.

En eun taol kont, a greiz ma oa hon den o preja evit ar gwella, e risklas war an hent bouilhennek ar silzigenn diweza a blije kement d'e staon ha d'e galon.

Folli a reas ar glazik ha ne gavas ano mat ebet d'ober outañ e unan. Koulskoude, kaer en doa en em jala, ne lakas ket ar silzigenn dianket da zizrei war an tamm bara.

Dao e voe eta d'ar pôtr astenn e zorn da glask ar pezh en doa kollet.

Eur boutad mat e chomas da furchal ha da furchal ar pri, ha kalzig amzer a gollas war an hent. Evelato e teuas a-benn da lakaat e graban war ar pezh a glaske.

Stad ennañ, ar glazik a gendalc'has gant e hent, muioc'h mui a diz warnañ. breman. Hag ar gountel, m'hen lavar d'ec'h a labouras adarre hag ar javedou ive.

Ar wech mañ, pa yeas laonenn ar gountel war ar silzigenn, houmañ a laoskas eur wikadenn. Hon den a jomas estonet fin, met ne wela ket liou e zaouarn, ne welas ket kennebeut war e damm bara an touseg bihan en doa dastumet. « O ! emezañ, gwikit ha diwikit, kement ha ma karit, evit va zamm silzig ne gollin ket. »

EUR BIGOUDENN.

KAMP ETREKELTIEK AR VREZONEGERIEN

Rennerien KAMP ETREKELTIEK AR VREZONEGERIEN a zo laouen o kemenn deoc'h e vo graet ar c'hamp-studi a zeu e PLEHENEG (Plouhineg e galleg), Bro-Wened, etre ar 6 hag an 19 a viz Eost, da lavarout eo kerkent goude gouelioù meur ar Bleun-Brug e Santez-Anna Wened. Emañ Pleheneg nepell eus an aod (2 vil m. bennak d'ar muia) war al linenn Kirri-tan a ya eus an Alre da Borz-Loeiz.

Evel warlene, hag ar bloavezioù arak, e vo digoret ar c'hamp d'an holl vrezonegerien gwitibunan, paotred yaouank ha merc'hed yaouank, a fell dezo peurlziski o yez pe zeskeur yez keltiek all.

Kentelioù brezonek ha kembraek a vo, prezegennou plijus hag abadennou laouen. Kelted tra-mor a zeu.

Priz an devez kamp : 400 lur.

Evit kaout diskleriadurioù hiroc'h, skriva da sekretourez veur ar c'hamp : an Itron de Bellaing, ar Vall, Gwengamp (Guingamp).

GERIOU KROAZ

	1	2	3	4	5	6	7
1							
2							
3							
4							
5							
6							
7							
8							

A-led. — 1. Gwin trenk. — 2. Allaz (dibennet) - Lart. — 3. Lenne eun eil gwech. — 4. A c'hell beza mat pe fall. - Kontrol da ya. — 5. « Ha te » skrivet hervez ar son. — 6. Lakae al levr e gwerz. — 7. O komz eus eul lec'h na weler ket. — 8. Bleunienn Salaun ar Foll.

A-serz. — 1. Kouign. — 2. Da wad a zivero (dibennet). — 3. Breur Kain. — 4. E laki an tan da gregi. — 5. Menez-tan brudet eus Bro Italia. - Hennez a savas eun arc'h divent. — 6. Implijet da faouta keuneud pa vez re galet. — 7. Da lakaat eur vag da vont war-raok.



Cliché « Le Pèlerin de Ste-Anne »

Bleun-Brug Keranna
d'an 3, 4, 5 a viz eost
a vo eur mor a gan
en enor da vamm-goz
ar Vretoned ;
hag ivez en enor da
Ivon Nikolazig
al labourer-douar santel
a welas Santez Anna
hag a gomzas outi
meur a wech
e brezoneg